

I. An eur ma son kloc'h ar skol

Tirin titirin tirin titirin tirin...

Kerkent ha sonet ar c'hloc'h en em lakas ur pemzek paotr bennak war-sav ha kregiñ da fourrañ o c'haieroù e pep a sac'h. Tomaz ne oa ket e-touez ar re ziwezhañ. Daoust ma'z eo plijet gant ar skol ez eo mall gantañ distreiñ d'ar gêr hiziv : un dek diwar dek en deus tapet war al latin ur wezh ouzhpenn. Plijet e vo e vamm. N'he devez ket kalz a zudiamantoù evit an deizioù.

Kollet en e soñjoù ne glev ket unan bennak oc'h erruout a-dreñv e gein hag an dorn a boz war e skoaz a lak anezhañ da c'hourlammat :

"Gourc'hemennoù, Kadiou !

- Ya, Aotrou Levarc'h, trugarez deoc'h, emezañ gant ur mousc'hoarzh.

- Petra en deus divizet ho tad diwar ho penn, abaoe ma oan bet du-se ?

- Chom a ra etre daou soñj c'hoazh, aotrou.

- Un druez vefe leuskel ho empenn dibar da vreinañ en teil.

- Ma mamm 'vije gwelloc'h ganti gwelet ac'hanon o vont pell gant ma studioù. Met gant an hini bihan a zo war-nes erruout, n'eo ket tomm ma zad ouzh ar soñj-se. Gwall sikouret e vije ganin en ti-feurm.

- Ha c'hwi, Kadiou ? Petra eo ho soñj-c'hwi ?" a hirvoudas ar mestr-skol kozh en ur sellet pizh ouzh an

dremm yaouank fas dezhañ. Daoulagad du lugernus ha bev a oa o sellet outañ. Prim e eilgerias ar c'hrennard, jourdoul ennañ :

"Me, aotrou ? A... Lenn ha skrivañ a blij din kement..."

Ur goumoulenn a dremenas e maboù e zaoulagad.

"Hiziv an deiz eo ret bevañ da gentañ, a lavar ma zad. N'on ket sur e c'hellin kenderc'hel..."

Aet an teodoù d'ar foar. O klask ur respont e oa ar mestr. Kavout a reas unan dereat a-benn ar fin :

"Ret vo sentiñ ouzh da dad, evel just. Bez soñj koulskoude : pep den a zibab e blanedenn. Daoust ma 'z eo diaes da welet evit poent, moarvat..."

Ur c'haloupadenn. Pennoù bugale a zeuas war-wel e toull an nor chomet digor :

"Aotrou ! Aotrou Levarc'h ! Deuit buan !

- Klask zo war ho lerc'h !

- Emeur o c'hortoz ac'hanoc'h war ar blasenn, aotrou Levarc'h !"

Cholori oa savet en un taol, an holl a oa o komz asambles. An aotrou Levarc'h ne feukas ket. Ur jestr choual hag e sioulaas kerkent an engroez yaouank. Ur paotrig blev melen a gomzas e-unan :

"Estrañjourien a zo o paouez antreal er bourk. Goulennet o deus war-lerc'h ar skolaer.

- Estrañjourien ? eme hemañ, souezhet.

- Termajied ! Termajied ! An dermajied !" a darzhas an holl, birvilh enno. Mont a rejont kuit d'ar

red, ken buan ha ma oant erruet. Aet e oa Tomaz asambles ganto. Ur c'hruz a reas an aotrou Levarc'h d'e zivskoaz a-raok mont war o lerc'h, didrabas, ur mousc'hoarzh o flodiñ war e vuzelloù.

II. An dermajied

War plasenn an iliz e oa ur bern bugale dija, paotred ha merc'hed, dres echu ar skol ganto d'an eur-se. Tri c'harr a oa en em gavet. Stelejet gant kezeg e oant, ha ken divoutin e oa ar gompagnunezh bodet warno ma chomas an holl da sellout outo ur pennad brav.

"Aze emhout, 'benn ar fin ? Pelec'h e oas chomet ? Ur plac'h pevarzek vloaz bennak a oa erru da gichen Tomaz hag e vignoned.

- O komz gant ar mestr-skol.

- Adarre ? a souezhas an hini vihan

- Petra 'ri..." a laoskas, a-raok parañ e selloù da vat war an dud nevez-erruet.

Ur charaban e oa, renet gant ur paotr yaouank. Chomet e oa azezet ouzh ar stur, ken digas ha tra dirak ar strollad tud-se. O c'hortoz e oa.

Pemp den a oa azezet war ar bankoù. Ur c'houblad gant ur bugel daou vloaz bennak etrezo. Ma seblante skuizh an holl veajourien e oa war tresoù ar vaouez-se liv ar c'hleñved. Ouzhpenn e oa dougerez, anat. Ur vamm-gozh oa en he c'hichen. Ur plas goulo. Ur plac'h yaouank. Daoust d'ar mall en doa da welet pep tra e vantas Tomaz ur sell hiroc'h war honnezh : ne oa ket kalz oadetoc'h egetañ, sur a-walc'h. He dilhad a oa truilhennek a-walc'h, daoust d'o livioù bet flamm. Met an dremm koant ha mennet a zeue warwel dindan ar mouchouer a c'holoe he blev a oa eus ar

re vravañ tout. Sell ar plac'h, hag a oa dres o tremen dreist pennoù ar skolidi, a groazias e hini. Na komz na mousc'hoarzh. Chom a reas ur pennadig da sellet pizh ouzh Tomaz, dedennet, a-raok leuskel he daoulagad da vale war ar barrezianed adarre.

"E ! a ruoc'has mignon Tomaz, Tilin, en ur gouezhañ warnañ... Ma digarez". Bountet gant unan bennak all e oa bet o skeiñ kreñv ouzh kostez e vignon.

" ...'Peus ket bet a zroug ?

- Nann, nann" a respontas Tomaz en ur hejañ e benn, divoemet. "Kudenn ebet." E sell a glaskas hini ar fulenn adarre, en aner. Bugelig ar charaban en doa kerzhet war he zu ha bremañ e oa-hi oc'h ober war e dro gant teneridigezh, o vouskanañ un dra bennak marteze. Re a drouz a oa.

"Ur sapre chevreñn, n'eo ket ?" a gendalc'has Tilin en ur heuliañ sell e vignon. Ne fellas ket da Domaz diskouez e from avat :

- Eñ ? Uuu... a ya... ba, me, te oar... Lâr din, petra a c'hellont kuzhat dindan ar ballinoù bras-se, d'az soñj ?

O tiskouez an daou garr all e oa. Karrigelloù da lakaat foenn e oant bet sur a-walc'h. Kinklet e oant bremañ gant lizherennoù bras ha livioù flamm. C'HOARIVA ANSELME, a lennas Tomaz hep poan daoust ma oa korvigellek ar skritur, stumm flammennoù tan dezhi. Pep a baotr yaouank a oa ouzh ar sturioù, gidoù ar c'hezeg etre o daouarn c'hoazh. O

c'hortoz e oant koulz hag ar re all. Daou sapre charread a oa aze, kuzhet dindan pallennoù ha liennoù. Pakadoù personel ar veajourien en unan eus an div garrigell, sur mat. Met en eil ?

"Piv oar ? Tilin en em lakaas da hunvreal a vouezh uhel. Arzhed ? Marmouzien ?

- Peadra d'ober troioù-fizik ! a ginnigas ur paotrig e-kichen, leun a spi .

- Ha ma vefe... euzhviled ? a c'houlennas ur plac'hig vihan lent gant ur vouezhig ankeniet.

- Spi 'm eus hor bo droed da zont da welet, eme ur c'hrennard, paret e selloù war ur strolladig tud o tivizout gant forzh jestroù, a-zehoù, dirak dor-borched an iliz.

Eno e weled tri den. An aotrou person gwisket e du. Ar skolaer, kravatennet dindan e saro labour. Un den tro hanterkant vloaz da echuiñ, gantañ un tok feltr etre e zaouarn. Ront ha ruz oa e zremm, rouez e vlev war e gloenn.

Tre d'ar momed-se e fiñvas an trikon. An termaji a zistroas war-zu kreiz ar blasenn, heuliet a-dost gant ar skolaer. Ne arsavjont ket dirak ar charaban, met ar skolaer, goude bezañ klasket unan bennak en engroez, a skoas war-eeun war-zu e skolidi, heuliet gant an den dianav. An aotrou person a chomas dirak dor an iliz, sonn en e sav, peg e daouarzorn ouzh e gostezioù. Ne oa ket war e dremm ur seblant joaüs. Tamm ebet.

III. Ar c'hinnig

Ma teue an daou zen war-zu Tomaz eo peogwir eo dezhañ o doa c'hoant da gomz.

"Setu Tomaz...", a ginnigas ar skolaer d'an den e dok feltr.

Ar skolidi all a bellaas un tammig, o stummañ ur c'helc'h tro-dro dezhañ, e-pad ma oa e c'hoar Koupaia o tostaat. O welet anezhi e teuas Tomaz en-dro ennañ e-unan. Ar soñj trumm e tlefe bezañ aet kuit dija a dreuzas e spered. Er stad ma oa mammig... Spi a vagas ne badfe ket re bell an diviz.

"...Tomaz zo akuit mat da skrivañ, a gendalc'he ar mestr. Ur skoliad eus an dibab eo."

Santout a reas Tomaz ur skoulm o stardañ e gof, en diabarzh. Fulenn ar charaban a oa o sellet outañ adarre. Daoust ma ne wele ket anezhi en sante. Ruziañ a reas en un taol. Klask a reas tolpiñ e soñjoù war ar pezh a oa an den o lavaret dezhañ. Ret e oa, peogwir en doa ur pouez-mouezh estren, daoust ma komze brezhoneg. Diaes oa da intent.

"Laouen bras on oc'h ober anaoudegezh ganit, mabig, eme an termaji en ur hejañ e vrec'h gant nerzh. Kontant 'vefes da labourat evidomp ?"

IV. War hent ar gêr

Daou gilometr bennak a oa etre ti-feurm Kadiou bras, tad Tomaz, hag ar bourk. Ne oa ket kalz tra, meur a vogel eus ar gumun a zeue eus pelloc'h bep mintin war-droad.

Koulskoude n'eo ket war-droad e tistroas Tomaz d'ar gêr neuze, nag e c'hoar Koupaia kennebeut. Ur plas a voe kavet evit ar skolaer war ar charaban zoken. Ezhomm vefe dioutañ c'hoazh.

Azezet reut e-kichen paotr an eil karrigell, ne gredas ket Tomaz digeriñ e veg goude bezañ saludet en ur bignat. Ar blenier yaouank ne glaskas ket toullañ kaoz gant Tomaz kennebeut. Un tres sichant en doa koulskoude, a soñje Tomaz en ur sellet outañ a-gorn. Neuze en em lakaas da valañ soñjoù gwenn kement ha soñjoù du, paret e sell war ar charaban dirazo. E c'hoar a oa ennañ o komz laouen gant ar vamm-gozh hag ar plac'h yaouank en doa merzet kent. Ne seblante ket chalet gant an dro-gaer, er c'hontrol.

Ur strollad c'hoariva e oa eus an holl dud-se, a listennas Tomaz en e benn. O sevel pezh e oant. Ezhomm o doa eus unan bennak evit adkopiañ un dornskrid a oa o kouezhañ en e boull. Ar skrivener kent en doa kuitaet ar strollad un nebeud amzer a-raok. Setu m'en em gavent gwall ankeniet o klask gouzout piv a c'hellfe ober al labour en e blas.

"Diouzhin e vefe, en doa respontet Tomaz, daoust ma oa tev ha ponner an dornskrid bet diskouezet

dezhañ gant an termaji. Pelec'h e kavin peadra da skrivañ ?

- Ar paotr en doa laosket e aferioù, gall' a ri ober ganto, eme an den. Aze 'maint, emezañ en ur ober ur jestr war-zu ballinoù ar c'hirri, en ul lec'h bennak. Ma vank tra pe dra e vo prenet ganeomp. Pegoulz e c'helli kregiñ ?"

Tomaz a zigoras e veg... hag a chomas dilavar : hag e dad ? Dec'h c'hoazh en doa lavaret e vefe ret dezhañ sikour gant e vreur Leon en ti-feurm a-benn nebeut...

"Me welo da dad", eme ar skolaer a zivine. Entanet e oa gant ar raktres. Tost da fin ar bloavezh-skol e oa, hag evitañ e vije ar bloavezh-skol diwezhañ. A-benn un nebeud deizioù ez afe war e leve, hag e wreg a sache anezhañ war-zu ur c'horn-bro all da echuiñ o buhez, setu ma n'hellfe ket ober al labour e-unan peogwir e oa o vont da zilojañ. Ur skolaer nevez a zeufe e miz Gwengolo.

Tud all estreget Tomaz a ouie lenn ha skrivañ er barrez, hag anavezout a rae anezho holl. Met da heul an diviz e oa o paouez kaout gant e skoliad eo an dremm gentañ a oa tremenet en e soñjoù. Ouzhpenn en doa spi an den mat-se e vefe paet al labour en un doare dereat evit ur bugel, hag e krede gwelet aze ur chañs evit Tomaz : gallet kenderc'hel gant e studioù en ur gounit e-unan e damm kreun, tamm-pe-damm...

"Gant ma asanto tadig, a bede Tomaz didrouz, ma Doue, ma Doue, gant ma asanto..."

Hag e joge e dok boulouz etre e zaouarn kropet. Oc'h erruout e oad.

V. Deizlevr Tomaz, da vare aozañ koan

D'an 13 a viz Mezheven 1910

Roet eo bet ar c'haier-mañ din gant Eontr Anselm, asambles gant traoù Herve, ar paotr a labourer evitañ araozon. Ar paotr a c'hoarie er pezh, met n'en em gleve ket gant Anselm hag a ren ar strollad a-bezh, setu m'en deus kavet gwelloc'h mont kuit.

Tadig ne oa ket laouen o welet Anselm hag an aotrou Levarc'h o tont. Dre chañs e oa deuet hemañ a-hend-all e kav din e vije c'hwitet an taol.

Dre ma felle da Dadig gellet implijout ac'hanon da labourat gantañ ur wezh an amzer, diouzh ezhomm, en deus asantet prestañ Prad-an-traoñ da Anselm hag e dud. Kopiañ a ran seul wezh ma c'hellan, aze, war korn an daol, lec'h m'emaon bremañ. Hag Anselm a zeu alies da gemer ar pezh a zo bet graet dija : war an deiz e pleustront gant ar pezh zo bet skrivet ganin.

Ne vezan ket direnket alies gant tadig : en em zibab a ra gant Leon evit poent. Sur on eo laouen e rastellfen un nebeud gwenneien, pe e vije en doare-se pe en un all...

A-hend-all ez a yec'hed mammig war wash...

Plop ! un dakennad yod-kerc'h a erruas dre blavañ. Moc'het ar c'haier.

"Laosk ac'hanon, Koupaia, o labourat emeon. 'Peus ket da veskañ se dres war ma aferioù !

Koupaia a bellaas, mouzhet.

"Sikouret 'vezen ganit da aozañ koan, a-raok. 'Vin ket ken ?

- Geo, pa vo echu ma labour ganin.

- N'eo ket labourat 'maout oc'h ober aze. Ar follennoù bras-hont a yelo gantañ evel boaz. Da betra e servij ar c'haier bihan-se neuze ?

- Da bleustriñ, din da stummañ atav lizherennoù kaer...

- Diskouez a ri din ar pezh a skrivez warnañ ?

- 'Rin ket.

- Laosk Tomaz da labourat, Koupaia, a droc'has ar vamm gant ur vouez wan. Gourvezet e oa war he gwele kloz digor. Bez e oa o paouez digeriñ he daoulagad. "Ha te ivez, gra war-dro da labour. Piv a aozo koan a-hend-all, pa n'hellan ket sevel ?"

Ur fiñv a reas evel p'he dije c'hoant en ober memestra, pezh a zistroas Koupaia d'he labour kerkent :

"Mat eo, mammig, gouest on. Ober a rin dres evel dout."

...aat. M'hen dare hag-eñ c'hello dougen an hini bihan betek ar fin. N'eo ket evit sevel ken, ha koulskoude n'eo sañset gwilioudiñ nemet tro fin miz Eost. Nec'het on ganti. Dreist-holl pa welan e ra van da vezañ laouen ha yac'h evel ma oa a-raok. E gwirionez em eus aon n'he defe ket nerzhioù ken. Ha ma varyfe ?

N'en em sante ket gouest da vont pelloc'h.

Renkañ a reas aketus ar c'haier, ar bluenn hag al liv goude bezañ sec'het e bajenn gant un hanter follenn paper-stouv, hag ez eas da serriñ ar pep tra-se gant damant dindan e c'holc'hedenn blouz.

E dad 'oa o tont. Ne oa ket e-unan. E vouezh a gleved o tostaat.

"Setu ar baotred, eme Goupaia. N'eo ket tre echu ganin. Mont a ri da glask ar gevelled ?

- Da belec'h ?

- Da di Janig an tu all, 'lec'h m'emaint o c'hoari."

Daoust d'he fevarzek vloaz e ouie Koupaia ren labourioù diabarzh an ti evel pa vije ar vestrez dija, a soñjas Tomaz en ur zigeriñ an nor. Dre chañs. Penaos e vije graet a-hend-all ?

Treiñ a reas ar c'horn evit tremen dirak e dad hag e zivizer dianav en ur vont war-zu ti an amezeien.

VI. Ar vizitourez

Kerkent e anavezaz Tomaz ar bizitour da vizitourez. Honnezh e oa ar plac'h yaouank en doa merzet er charaban pa oa erruet ar gomedianed war plasenn an iliz. Chom a reas a-sav, lentet.

"Setu ma mab, Tomaz, eme e dad. Eñ eo a labour evit ho eontr.

Un hej d'he fenn a reas ar plac'h en ur vouse'hoarzhin outañ, e-pad ma kendalc'he tad Tomaz war-zu e vab :

- Kaset eo bet Koulm gant he eontr da zastum al labour 'peus kaset da benn hiziv...

- Hag ivez da brenañ vioù ha laezh diganeoc'h, ma z' eus", a gendalc'has ar plac'h. Astenn a reas he faner aozilh hag he bidon laezh dezhañ.

Tomaz n'en doa ket c'hoant tamm ebet da chom pell amzer e-unan gant ar plac'h, a sellfe outañ hag a glaskfe toullañ kaoz gantañ e-pad ma vefe o leuniañ dezhi he bidoniad. Setu perak e tec'has kuit en ur redek :

"Goulennit ar follennoù gant Koupaia. 'C'h an da gerc'hat ar re vihan evit koan", a huchas en ur vont diwar-wel.

Erruet en tu all d'ar c'hleuz, 'lec'h ma ne c'helle den gwelet anezhañ ken, e paouezas da redek hag e kerzhas goustadik-meurbet war-zu an ti-feurm ma kavfe e vreudeur. Skeudenn ar plac'h a zañse dirak he daoulagad. Koant tre e oa. Biskoazh n'en doa gwelet

hini ebet ken koant.

"Opala, Tomaz, eme ur vouezh don ha flour, d'ober petra out deuet betek amañ ?

Souezhet-mik e chomas Tomaz dirak e vreur bras, Leon, a oa o skeiñ war e du, heuliet gant ar c'hevelled.

- Tadig n'en doa ket lâret dit ez afen da gerc'hat ar re vihan ?

- A !? Uuu... Nann... Ral eo dit ober !

- Ba. Mar karez e rin aliesoc'h diwar-vremañ, m'out re zalc'het gant da labour.

- N'on ket, mont a ra, te 'oar...

- Ober a rin memestra, eme Leon gant ur mousc'hoarzh frank.

Respont a reas e vreur gant ar memes hini. Pelloc'h eget ti Janig, du-hont, en tu all d'an hent, e oa Mari o chom. Ur bennhêrez koant e oa ha pell a oa en doa merzet Tomaz e oa e gouloù e vreur. Sur e oant en em glevet er pardon ar wezh all...

- Telo ! Tudi ! a c'halvas, pa verzas e oa chomet ar gevelled pell war o lerc'h. Erru oc'h ?

- Sell, Tomaz, ar pezh hon eus kavet..." emezo kazi asambles en ur erruout ganto, leun o daouarn a deñzorioù eus ar c'hoad.

Ugent munutenn bennak war-lerc'h, pa errujont er gêr, e oa aet kuit ar plac'h.

VII. Emgav

"Lâr deomp, penaos int ?

- Petra 'n eus goulennet an termaji ganit ?

- N'eus nemedout o profitañ !

- N'eo ket reizh !

- Pegoulz e c'hellimp dont ganit da welet anezho ?"

War ar porzh e oa holl baotred ar skol, da vare an troc'h. Ober a reas Tomaz ur c'hruz d'e skoaz.

"Pa fello deoc'h.

- Pleustriñ a reont ?

- Pegoulz 'vo c'hoariet pezh ?

- Hag ar plac'h ? Pegoulz vo c'hoariet ar plac'h ?" eme unan bras o c'hoarzhin druz. Ne seblante ket bout gwall fin. Dede 'oa e anv, Dede ar beulke zoken - pa veze pell -.

"Skarzh kuit, a respontas en ur bellaat, heuliet gant e gameraded. N'en doa ket c'hoant da glevet seurt traoù. Pa soñje e Koulm, plac'h yaouank ar charaban, eo he mousc'hoarzh leun a heol a wele en e benn. Ur mousc'hoarzh brav ha fromus e oa.

"Ha pa z'afemp da spiañ anezho ? eme Tilin. Evel-se e ouezimp petra a vitellont...

- Me, ne'm eus ket droed da dostaat, eme ur paotr du e vlev. Ma zud ne fell ket dezho. Ma mamm a lâret int mevelien an diaoul.

- Na me ivez. Me kennebeut, a heulias meur a vouezh.

- Bo ! Ur seurez pil-pavez eo da vamm, a daolas unan bras.

- Gwelloc'h eo eget bezañ pagan evelhout, n'ez a den d'an oferenn en da familh ! Ur vezh ! a respontas an hini bihan, feuket, a-raok pellaat gant ur strollad a baotred a vent gantañ.

- Selaouit, paotred, a gendalc'has Tilin, harp ouzh ar wezenn-dilh vras. Deomp fenozh. Goude ar skol. Ar Gwener zo hiziv, ne vimp ket gortozet da zistreiñ diouzhtu d'ar gêr. Mat eo dit, Tomaz ?

- Me ne ran forzh. N'int ket din.

- Me 'vije kontant da c'hoari pezh ganto, na c'hwi ? eme Gaourintin, ur paotr pevarzek vloaz.

C'hoant a savas er re all ivez :

- Ya, gwir eo. Dreist e vefe kemer perzh.

Pep hini a chomas da chaokat ar soñj-se a-hed ar gentel ziwezhañ. Ya, dreist e vefe kaout ur rol, ha pa vije unan bihan, er pezh-c'hoari...

VIII. A-dreñv ar c'hleuz

Koupaia 'oa chomet er gêr d'ober war-dro an ti hag ar gevelled : n'ae ket gwelloc'h gant o mamm, n'helle ket sevel, ha sur mat e chomfe war he gwele betek ar gwilioudiñ...

Ne oa ket Tomaz e-unan war hent an distro an deiz-se avat. Tilin, Benead, Jos treut ha Yannig vihan a oa o kerzhout asambles gantañ war-zu koumanant Kadiou.

Lampr oa an teodoù war an hent, ne santjont ket an daou gilometr o tremen. Buan ez errujont nepell eus Prad-an-traoñ.

"Chomomp a-dreñv ar c'hleuz, a ginnigas Tilin. E-giz-se e c'hellimp gouzout ur bern traoù hep bezañ rediet da c'houlenn..."

Dre ma tostaent ouzh ar stêr e c'hellent spurmantiñ barakennoù koad ha lien bet savet gant an dermajied d'ober o annez. Lakaet e oant bet e-kichen ar c'hirri e stumm ur c'helc'h digor, a skoe war ribl ar stêr. Ul leurenn greiz a oa bet stummet e mod-se. Tan ar boued a vogede dousik e kalon ar blasenn-se. Ar vaouez dougerez a oa o veskañ un dra bennak er chaoudouron, he bugelig stag ouzh he brozh. Ne wele ket ar c'hleuz a oa bugale ar skol a-dreñv dezhañ. O sellet war-zu ar stêr e oa, lec'h ma oa bodet an dermajied all.

A-raok kompren mat ar pezh e oant oc'h ober e voe skoet strolladig ar baotred gant ar sonioù a save

eus al lec'h. Tud a oa o kanañ, hini ha hini, a-wezhioù muioc'h war un dro. Mouezhioù boud evit ar baotred, a verzas Tomaz, skiltroc'h evit ar merc'hed. Unan a zlee bezañ hini Koulm. Tomaz 'nije bet c'hoant da welet anezhi, met war un dro en doa aon e vefe-hi gwelet gant e gamaraded. C'hoant en doa da gaout anezhi evitañ e-unan. Daoust m'en em sante droch dirazi.

Ne oa ket tamm ebet evel ul laz-seniñ. An dud ne oant ket sonn en o sav kichen-ha-kichen, hag an trouz a errue betek diskouarn ar strollad paotred ne veze ket heson atav. An dermajied a oa o kanañ o rol, e-pad ma oant o c'hoari. Ar pezh a lârent a veze kanet. Atav. Tomaz ne ouie ket, setu ma savas c'hoant ennañ da dostaat a-benn klevout an destenn en doa kopiet.

Gouzout a ouie eus petra oa kaoz, evel just. Lakaet en doa Anselm en e benn c'hoari ur pezh a oa bet leurennet gant ar strollad bloavezhioù a-raok, dija : *Krouidigezh ar bed*. Cheñchet e oa aktourien abaoe, war-bouez Anselm hag ur vaouez kozh, hag ar re yaouank ne anavezent ket an destenn. Ret e oa dezho adkopiañ ar pezh evit gellout pleustriñ : re gozh e oa o dornskrid, krog oa da louediñ hag un nebeud pajennoù a oa bet kollet dija. E brenañ vije bet re ger. Marc'hadmatoc'h e oa paeañ Tomaz evit adskrivañ pep tra a-vuzul eget prenañ ul levr moulet.

Ne oa ket erru gwall bell c'hoazh met talvoudus e oa e labour dija. Gwelet a rae an Aotrou Doue, gwenn en ur seurt liñsel, ur barv hir o tiskenn betek e zaoulin,

o kanañ un dra bennak d'ur paotr yaouank : Tomaz a anavezas an hini a oa o vleniañ ar c'harr en doa o c'haset amañ, an noz kentañ. Gourveziñ a reas war an douar e-kichen ur wezenn, en ur zibunañ un arridennad gwerzennoù kanet war un ton aspedus. Eontr Anselm, hag a oa e-kichen, ur mell follenn en e zorn, a lammas e kreiz al leurenn en ur huchal neuze :

"Ta !ta !ta ! n'eo ket se c'hoazh. Ober en-dro, Korneli."

An den a savas hag a adkrogas gant e dennad en ur ganañ. Ar wezh-mañ e seblantas bezañ diouzh grad Eontr Anselm, peogwir e laoskas ar senenn da vont pelloc'h. Setu m'en em gavas Koulm-Eva e-kreiz al leurenn, o kanañ a-unvouezh gant Korneli-Adam : ganet e oa ar Vaouez...

"Setu hi o tont, a hiboudas Tilin e skouarn Tomaz. Dedennet e oa gant ar plac'h yaouank ivez. Ne oa ket en noazh evel ma vefe sañset bezañ hervez an Testamant Kozh. Ur sae c'hlas hir a ziskenne betek he zreid, met he blev du ha fonnus a oa distag war he c'hein, ar pezh a ziskoueze anezhi evel pa vijec'h bet hoc'h-unan ganti er gêr, war-nes mont d'ho kwele asambles... Iskis en em sante Tomaz. Boemet dirak ar skeudenn, met lakaet diaes war un dro. Karet en dije bezañ e lec'h all. Ne blijte ket dezhañ rannañ ar skeudenn-se gant Tilin, na gant ar re all. Ouzhpenn e sante an enkreiz o krignat e galon : paotred yaouank all a oa er strollad c'hoariva. Korneli, aze, ha reoù all ivez. Ha m'he defe joa Koulm ouzh unan anezho dija ?

Profitañ a reas Tomaz eus un troc'h gant Eontr Anselm evit distreiñ e sell hag azezañ war ar c'hleuz.

Dres d'ar mare-se e klevas hopadennoù en tu all. Unan bennak en doa spurmantet anezho, hag a oa o c'hervel gant forzh jestroù :

"Deuit, paotred ! Dedostait betek amañ !"

Guiomar, unan eus paotred yaouank ar strollad e oa. Sachet en doa evezh an holl warno hag e-pad un nebeud eilennoù e voe tost da Domaz hag d'e vignoned sachañ o skasoù ar buanañ ma c'hellent. Tomaz a gredas dezhañ bezañ bet anavezet gant ar paotr yaouank avat, setu perak e reas sin d'ar re all chom a-sav ha gortoz.

Nec'het e oant un tammig en ur sellet ouzh Guiomar o tont daveto en ur redek. Kregiñ a reas da gomz, dialanet :

"Ma zad a bed ac'hanoc'h da zont da welet a-dostoc'h."

Ar baotred a heulias anezhañ betek al leurenn-gamp.

"Donemat, paotred... pell zo e c'hortozen ac'hanoc'h da zont, eme Anselm, laouen ha degemerus, d'ar strollad tud yaouank. Eus mezhek ma oant e teujont da vezañ kurius :

- O c'hortoz e oac'h ? Perak 'ta ?

- Gouzout a ran an doare... Atav e vez tud o sellet ouzhimp o pleustriñ... Ur blijadur eo deomp ! Ha fellout a rafe din gouzout ouzhpenn hag-eñ ne vefe ket unan bennak ac'hanoc'h —pe meur a hini— kontant da

c'hoari. N'omp ket niverus a-walc'h amañ.

Ur cholori a savas kercent :

- Me ! Me aotrou ! a respontas ar baotred asambles, war-bouez Tomaz ha Yannig vihan a ouie e oant re vihan evit bezañ degemeret, just a-walc'h.

- Koulm ! eme Anselm war-zu ar plac'h yaouank, a dostaas. Kae da lemel da grezenn kuit; ha ro anezhi da hemañ —da anv, mabig ?— a c'houlennas ouzh Jos treut. Kelenn a ri anezhañ war e rol. Kavet 'vo un dra bennak da ober da bep hini, gant ma c'hellot dont da bleustriñ ingal. Ar re ne c'hoariont ket a c'hell chom aze, a lavaras c'hoazh en ur ziskouez ul lec'h war geot ar prad.

"Ma ! amañ emhout ivez, Tomaz ? o paouez anavezout anezhañ e oa.

- Ya, aotrou.

- Gra eontr ac'hanon, ha c'hwi ivez, paotred. N'eo ket poent dit mont da skrivañ un tammig ? a gendalc'has, prederiet gant mont war-raok e aferioù.

- Geo, eontr Anselm. Bez e oan o vont da zistreiñ, goude bezañ kaset ar re all. Ne'm eus ket kalz a hent da ober ken, a respontas Tomaz."

Koulm a oa deuet en-dro, gwisket gant he dilhad pemdez, staget he blev en-dro. He grezenn oa ganti etre he daouarn. He astenn a reas da Jos, mouzhet un tamm, a-raok mont da sikour ar vaouez er gegin.

- Kaset 'vo follennoù nevez deoc'h warc'hoazh, eme Domaz da Anselm. Un akt nevez a oa o vont da gregiñ. E-giz-se e welin penaos ez an traoù war-

raok..."

En ur guitaat al lec'h e ouzhpennas dousik war-zu Koulm, a oa o tremen en e gichen, ac'hubet he divrec'h gant keuneud da vouetañ an tan :

- Perak ne fell ket dezhañ leuskel ac'hanout da c'hoari ?

- Divin 'ta ! Gwelet 'peus ur plac'h war al leurenn ur wezh bennak ?

- Ya, eme Domaz gant ur mousc'hoarzh fin. Bremaik. Ha koant tre e oa."

En ur ruziañ e tec'has Koulm kuit, hep kenavo.

IX. Izili ar strollad

Erru oa ar vakañsoù hañv.

Goude an droiad da Brad-an-traoñ gant e gameraded e kemeras Tomaz ar pleg da vont alies da sellet ouzh ar pleustradegoù. Seul ma z'ae an amzer war-raok ha seul vuioc'h a dud, paotred ha merc'hed, a rae eveltañ. Ul lec'hemgav e teuas Prad-an-traoñ da vezañ, ha dre ma oa anavezet ar roloù gant an holl e veze aes erlec'hiañ unan bennak diank pa veze. Ken ma ne oa ket re a labour en ti-feurm en doa amzer awalc'h Tomaz da skrivañ war an deiz ha da ziskuizhañ en ur vont da gas ar follennoù da Anselm diouzh an noz. Hag en doare-se e wele Koulm aliesoc'h.

Anavezout a rae Tomaz tud ar strollad bremañ. Ouzhpenn da Anselm, a rene an traoù hag a rae war-dro he nizez, e oa Gaidou, ar vaouez dougerez. Ne gemere ket perzh er pezh-c'hoari, amañ e oa abalamour d'he gwaz, Maodez, hag a c'houneze e vuhez en ur c'hoari pezhioù. Ganto e oa o merc'hig Sewa, ur veleganezig dilu ha leun a startijenn. Gaidou a ouie ober war-dro ar boued e-pad ma veze ar re all o pleustriñ. Korneli, blenier ar c'harr, a oa tro 18 vloaz. Trouz a oa savet etrezañ hag e familh, unan a renk uhel, p'en doa divizet mont da heul Anselm hag e strollad. Dalc'het en doa start d'e soñj koulskoude : c'hoari eo a rafe. Daou baotr a 17 ha 21 vloaz a oa ouzhpenn, Guiomar hag Alan. Guiomar 'oa mab Anselm. Evit Alan, ne ouie ket Tomaz penaos e oa

erruet amañ, met diskouez a rae bezañ maout war ar c'han.

Ne vije ket bet klok ar meuriad-se hep rummad ar re gozh. **En em ziskouez a rae dre ????** ur vaouez kozh stag ouzh ar strollad hag a hañvale bezañ mamm Maodez. Ma ouie erlerc'hiañ ur rol bihan bennak ur wezh an amzer e-pad ar pleustradegoù e kase he amzer o harpañ he merc'h-kaer er gegin pe war-dro Sewa. Tro fin an hañv e komprenas gwelloc'h Tomaz ne vijed ket bet evit en em zibab hep he bizied aour : he rol dezhi e oa ar gwriziañ. Ober a rae koulz war-dro an dilhad ha war-dro ar c'hinkladur. Togoù, rideozioù, saeoù, pep tra a veze savet ha kempennet ganti. Loeiza 'oa anv ar vamm-gozh, met pep hini a yae dezhi dre "mamm-gozh" evel pa vijent holl eus he familh. Tomaz a rae evelto.

X. Dialog etre Lena hag he mab

D'ar 15 a viz Gouere 1910

Aet eo Koupaia da zastum piz el liorz. Sañset on tapout krog em labour diouzhtu. Ne blij ket din e ouife re a draoù diwar-benn ma c'haier. Sklaer eo e vije gouest da lenn, ar bikez !

Skrivañ zo ret din. Re leun eo ma c'halon.

Koulm a aloub ma spered. Mont a ran kazi bemdez da Brad-an-traoñ ma choman da spiañ anezhi. Ne'm eus merzet netra a-berzh ar baotred all. Gouzout a ran on kalz yaouankoc'h egeti, met n'on ket evit herzel da soñjal enni.

N'ouzon ket penaos mont e darempred ganti. Biken n'hellin displegañ dezhi...

"O labourat emañ c'hoazh, mab ?"

O paouez dihuniñ e oa Elena Kadiou. O tougen he c'hwec'hvet bugel e oa. Fin, he c'hwec'hvet ne oa ket tre peogwir he doa kollet daou abaoe Telo ha Tudi, gevelled c'hwec'h vloaz ar familh. Ha setu ma oa dougerez adarre. Tremen a rae fall an traoù avat, ha kuit da goll un trede babig e oa bet aliet dezhi gant ar medisin chom war he gwele. E gwirionez ne oa ket uhel ar yec'hed ganti abaoe penn kentañ an dougen-mañ. War zisteraat ez ae, ha seblantout a rae da Domaz e oa e vamm o treuzlivañ a zeiz-da-zeiz. Ne veze ket koñfortet gant ar selloù nec'het a daole e dad hag e vreur henañ war-zu ar vamm diouzh an noz pa zeuent da goaniañ. Ne veze ket komzet eus ar

c'hleñved dirak ar vamm avat.

"Ya, mammig, eme Domaz en ur sevel evit dont da gichen ar glañvourez.

- N'eo ket re ziaes ?

- Nann, mamm. Plijadur 'm bez."

O flourañ penn he mab e oa Elena. Daoust ma kare anezhi en em sante diaes Tomaz. Ne oa ket ur bugelig ken.

"N'out ket dall, Tomaz, a gendalc'has e vamm.

- Nann, mamm, emezañ, enkrezet muioc'h-mui.

- Ne soñj ket din e padin gwall bell evel-se.

- N'eo ket gwir, mammig ! a enebas taer.

- Geo, gouzout a rez a-walc'h.

Un didrouz. Amzer d'ur skoulm en em staliañ e korzailhenn Tomaz. Kenderc'hel a reas Elena, dousig :

- Gra war-dro ar familh, Tomaz.

- Ya, mammig, eme Domaz.

- Koupaia zo ur plac'h kapabl, en em zibab a ouio ober. Met bihan eo Tudi ha Telo c'hoazh, eme Elena. Hag ouzhpenn...

- Ya, mamm ?

- An hini bihan...

N'hellas ket echuiñ gant ar glac'har. Tomaz a oa re voan e galon evit komz ivez. Komprenet en doa mat. Marteze e vevfe ar babig. Ret 'vije ober war e dro ivez...

Daoust d'e galonad e pokas d'an dremm karet en ur ober van da grediñ ne oa ken klañv-se :

- Na vez ket nec'het. Amañ emhout evit pell

c'hoazh. Hag ar babig a chom tri miz dezhañ er goudor c'hoazh, hervez ar pezh 'poa lâret din, ket ?

- Evit da studioù... a gendalc'has Elena, hep respont d'ar goulenn.

- Ya, mammig ?

- Komzet 'meus gant da dad. Gouzout a rez em bez-me plijadur o welet ac'hanout oc'h ober seurt labourioù, Tomaz. Evel-se e pleustrez evit mont da vestr-skol war-lerc'h, ha me vefe lorc'h ennon o kaout ur mab kelenner...

- Graet eo e soñj ? a c'houlennas Tomaz, leun a spi.

- Ne lâro na ya, na ket. Anavezout a rez anezhañ ! Met ne gav ket din e vije a-enep. Ar pezh a gont evitañ eo kaout un divrec'h nerzhus da sikour anezhañ war ar c'houmanant, ha da vreur Leon en em glev mat gantañ. N'eus ket ezhomm a zaou war an afer-se. Leuskel a raio ac'hanout da zistreiñ d'ar skol e miz Gwengolo."

Skeudenn an aotrou Levarc'h a dremenas dirak daoulagad Tomaz, hag en em santas evurus. Deuet e oa e daol da benn, al louarn !

"Mersi bras, mammig. Mersi. N'eus nemedout evit kompren ar pezh a vank din...

- Memestra, Tomaz, eme e vamm gant ur mousc'hoarzh hogozik laouen... Da vamm on !"

Ar c'hevelled a zeuas tre, o tont en-dro eus un droiad c'hoarioù. Chikan oa etrezo hag ur bern trouz a raent:

- Un dousig 'n deus Leon, emezo. Ma...

- Shhh ! Na lârit grik ! Sekred eo an traoù-se...
eme ar vamm, laouenaet.

Treiñ a reas war-zu Tomaz :

- Pell zo e ouzon se ivez ! a lavaras dezhañ e
kuzulik.

Dirollañ a rejont da c'hoarzhin, heuliet gant Telo ha
Tudi, laouen o kemer perzh daoust ma n'o doa ket
heuliet pep tra. Pell a oa n'he doa ket c'hoarzh
mammig.

- Mont a ra gwelloc'h ganit, mammig ? Yac'h out
bremañ ?

Gwezh ebet ne gomzas eus he yec'hed war-lerc'h.
Chom a reas engravet o diviz e spered Tomaz, avat.

XI. O pourmen gant Leon

Ne vez ket labouret da Sul. Na gant al
labourerien, na gant ar skrivenerien. Setu ma chome
gant Tomaz un nebeud amzer vak da leuskel e soñjoù
da nijal.

"Deomp da bourmen", eme Leon dezhañ goude
merenn. Koupaia a zistaolfe gant ar c'hevelled, o zad
a yafe da c'hourvez ur pennadig.

En em silañ a rejont er-maez. Brav ha tomm oa
an deiz. An heol, en e uhelañ, ne laoske tachenn
disheol ebet e-harz ar savadurioù hag ar gwez.

Tomaz a heulias e vreur a-hed an hent a gase da
Brad-an-traoñ.

"Ha Mari ? a c'houlennas. Echu eo etrezoc'h ?

- N'eo ket 'vat, a c'hoarzhas Leon. Emgav hon
eus.

- Emgav ? Pelec'h 'ta ? E Prad-an-traoñ ?

- Shhh ! Sell kentoc'h !"

En he sav e-kichen ur bod-keleñn e oa Mari o
c'hortoz. Fichet e oa evel evit an oferenn –N'he doa
ket lamet he dilhad-sul kuit, dezhi d'en em ziskouez en
he gwellañ dirak he dousig...

"C'hoari a ra, paotred ! a reas van da huchal gant
forzh jestroù, met ne reas ket a drouz koulskoude.
C'hoant chom kuzh ouzh tud zo he doa, anat.

Ur fulenn a blac'h e oa Mari, c'hoarzhus atav, beg
bras un tammig. Bihan-tout e oa chomet daoust ma oa
koshoc'hig eget Leon. Stouiñ a reas hennezh da vat

evit bouchañ dezhi karantezus. Ur c'houblad brav e oa.

Leon a gerzhe war-raok en ur heuliañ ar stêr dindan ar gwez haleg, Mari ouzh e vrec'h. War o lerc'h e heulie Tomaz, kurius.

Un trouz mouezhioù a voe klevet dizale.

Skoachet gant ar gwez ez ejont war-raok betek ma teuas pleg ar stêr dirak o daoulagad. Eno e oa ur bern tud oc'h ebatall en dour pe war ribl ar stêr.

"N'oas ket bet amañ gwezh ebet diouzh ar Sul, te hag a oar mat diouto ? a c'hwezhas Leon dezhañ.

- Nann. N'ouien ket."

Prantad soubañ merc'hed ar c'hoariva e oa.

Sewa, ar verc'hig, a gouronke en noazh, o krial gant ar blijadur, e-pad ma strinke dour warni he mamm he c'hof ront. Er stêr e oa antreet betek he c'hofoù gar goude m'he doa staget traoñ he brozh ouzh he gouriz. War geot ar ribl e oa azezet tad ar plac'hig e-kichen ar vamm-gozh, o-daou o treiñ kein ouzh ar vizitourien.

Tomaz ne welas ket Koulm diouzhtu. Dipitet e oa, pa spurmantas he fenn a-us an dour. Azezet war strad ar stêr en ul lec'h ma tlee bezañ un toull don a-walc'h e oa o c'hoari gant ar plac'hig ivez. He blev hir oa distag war he fenn, ha gleb. N'en doa ket anavezet anezhi da gentañ.

"Diwall ! 'maon o tont ! a huchas en he c'hoari en ur sevel trumm, hag ar plac'hig a dec'has kuit gant ur c'hoarzhadenn skiltr adarre.

Ur seurt sae hir a oa ganti hag a bege ouzh he

c'horf noazh evel un eil kroc'hen, peget ma oa outi gant an dour o tiverañ. He zrolinenn a lintre dindan an heol evel hini ur verc'h-vor. Pa droas war o zu e arvestas Tomaz ouzh he bruched sonn dindan an danvez gleb. Koant e oa, un eston.

"Tu tu tu... eme Vari war un ton farsal, en ur skoachañ daoulagad Leon gant he dornig. Frond dorn Mari a zistroas anezhañ d'ar bed gwrion : disoñjet en doa bezañs an daou all. E vreur a dapas krog e dorn e zousig hag a bokas dezhañ.

- 'Peus ket c'hoant da soubañ, Mari ?

- Fichet evel m'emaon, gant ma sae-oferenn ?
'Rin ket laouen !"

Ne raent ket van ouzh Tomaz ken. Profitañ a reas eus o marvailhat evit sachañ e skasoù, leun e gorf hag e galon gant skeudenn e goantenn.

XII. Reiñ an dorn en ti-feurm

Tad Tomaz a c'houlennas sikour e vab ar sizhun war-lerc'h. Ezhomm en doa renevesaat ar c'hrañj hag a ginnige kouezhañ en he foull. Ur stern koad, tachet plankennoù outañ, a yae d'ober anezhi a-fed mogerioù. Erru oa brein ar pep brasañ anezho. Chanter an hañv e vefe distagañ ar plankennoù kozh, berniañ anezho da vezañ losket e-pad ar goañv, sevel plankennoù nevez diwar gwez ar c'hoad a oa ul lodenn anezhañ war ar c'houmanant hag a oa ret naetaat forzh penaos. Ur mignon en doa staliet e veikanik-heskenniñ en diabarzh, hag ar saout a vefe bodet er-maez e-pad al labourioù. Diaesoc'h e veze o goro pa ne vezent ket en o endro boaz. Met kement-se ne selle ket ouzh Tomaz. Eñ a labourer gant ar wazed. Ha santout a rae e oa un dra vat evitañ. Plaen e oa e spered pa veze o labourat start gant Leon hag e dad. Ne c'houzañve poan-spered ebet neuze. Dont a rae a-benn da zisoñjal Koulm zoken – a- wezhioù...

Ma voe dipitet da gentañ o soñjal er pezh-c'hoari n'hellfe ket adkopiañ e kavas buan un diskoulm : da skrivañ en em lakae goude koan, e-pad ma veze Koupaia hag ar c'hevelled o tistaliañ an daol. Daoust ma veze brevet e gorf gant al labour tenn e adkave nerzh a-leizh da skrivañ diouzh an noz. Kropet e veze e vizied e penn kentañ. Neuze ez ae war-raok, hag e tisoñje.

Skrivañ a rae betek ma veze naet an ti ha lakaet

Telo ha Tudi da gousket. Neuze e rae Koupaia hag e dad war-dro ar vamm. Ezhomm he deveze sevel d'an eurioù-se. Leon a yae da vutuniñ dirak treuzoù an nor. Mont a rae diwar-wel, pelloc'h, ur wezh an amzer. Tomaz a ouie a-walc'h e oa o vont da saludiñ e vestrez. Pa n'ae ket e chome da gaozeal gant an tad war ar bank a-gleiz d'an nor betek ma serre an noz. Koupaia a veze ganto alies, o selaou peurliesañ pa veze kaoz dreist-holl eus traoù teknikel a selle ouzh labour an ti-feurm. Ha ma n'en dije ket bet Tomaz e labour adkopiañ da seveniñ e vije bet asambles ganto o tivizout eus an amzer a dremen hag eus an hini a raio... Met ne soñje ket e kement-se, tolpet ma oa e soñjoù war e gefridi.

"N'eo ket echu ganit c'hoazh ? a c'houlenne ar re all en ur zont tre.

- Ur pezh mell labour e oa neuze, mab !

- Uzañ a rez al lamp !

- Mir da nerzhioù evit warc'hoazh !

Mousfent a oa sur, met goap ne oa ket, hag e ouie Tomaz e oant evurus o welet e oa sirius war ar garg betek fiziet ennañ. Setu ma kendalc'he e-pad ur c'hard eur bennak c'hoazh betek ma vefe pignet pep hini d'e glud. Ar gweleoù-kloz a rae tro ar mogerioù : hini e dad gant he mamm, hini Koupaia a-us gwele ar c'hevelled hag a oa kousket abaoe pell hag e hini-eñ, Tomaz, a ranne gant Leon.

"Penaos e vo pa c'hano ar babig ? a soñjas en ur lemel e zilhad. E penn kentañ vefe lakaet ar gavellig

koad war bank tosel gwele e dud. Met pa vefe re vras vefe ret kavout ur plas dezhañ er gweleoù kloz ivez... M'eo ur plac'hig e yelo gant Koupaia, a soñjas. Diskenn a raio ar merc'hed ha Telo ha Tudi vo kontant da bignat en estaj. Met ma vez ur paotr...

Ganin e vo lakaet, a soñjas. Hag e stardas e galon. En oad da vont kuit e oa Leon. N'en doa ket komzet eus se c'hoazh, met pa vije euredet gant Mari...

« Ba. Gwelet 'vo", eme Domaz ennañ e-unan en ur serriñ e zafar-skrivañ dindan treid e c'holc'hed. Eno e teufe Koupaia da gemer ar follennoù nevez skrivet, warc'hoazh, pa bignfe unan bennak eus Prad-an-traoñ a-ratozh evit-se...

Lazhañ a reas ar c'houlouenn.

A-raok menel kousket e klevas trouz mouezhioù o kanañ, du-hont, war an hent : e Prad-an-traoñ oa echu ar bleustradeg ivez, ar c'hoarierien hag an arvesterien a oa o tistreñ pep hini d'e di, en ur genderc'hel da ganañ o ferzhioù... Tomaz, laouen o soñjal enno hag e Koulm, e sankas en ur c'houk c'hwek.

XIII. Ar gwallzarvoud

Buanoc'h eget n'en doa soñjet en em gavas Tomaz da gousket e-unan en e wele-kloz, allas.

Kazi echu oa reneveziñ ar c'hrañj. Pemzektez 'oa padet. Deuet e oa Tomaz a-benn da gas e zaou labour war un dro. Pa ne veze ket er gêr war an deiz eo Koupaia a roe d'an hini a zeue bemdez al labour kaset da benn en derc'hent. Tomaz a wele diouzh an noz e oa aet kuit ar follennoù, hag a skrive reoù nevez. Treiñ a rae plaen ar bed.

"Ne vank ket kalz tra ken, eme ar wazed en ur sellet ouzh o labour a-raok kregiñ e-barzh, kroaziet o divrec'h ouzh o bruchedoù.

- Hemañ da ziskar c'hoazh ha graet an dro, eme Leon ha na oa ket boazet da gilañ rak al labour. Harpet ouzh ur wezenn-bin e oa. Ne vo ket implijet penn-da-benn, met ar peurrest a yelo da geuneud...

Daoust ma n'en sante ket e tlee bezañ skuizh. Kregiñ a reas da grapat er wezenn evit stagañ ar fun an uhelañ posubl, evel m'en doa graet evit ar re all. Penn all ar gordenn a vefe staget ouzh ar c'harr, hag hennezh, sachet gant ar jav, a ziskouezfe d'ar wezenn hanter-droc'het he c'hef war peseurt tu kouezhañ. Ar mare ma kouezhe ar wezenn e oa ar pep dañjerusañ evel ma ouie pep hini. Setu perak ne oa bet kudenn ebet war ar poent-se.

Nann, e-unan eo en em lazhas Leon.

Dre ma oa o pignat gant ar skourroù, hag eñ tost

da gern ar wezenn, e vankas e dreid. Tomaz, e dad hag ar mignon a laboure ganto a sellas outañ o tiskenn gant ar brankoù, dizingal, diouzh ma chome a-skourr ouzh hini pe hini pe ma ne gave skoilh ebet war e hent e kouezhe fonnusoc'h. Ur garm a livas war beg an tri den e-pad lamm Leon. Echuiñ a reas e gouezhadenn war al leur, dizamant.

"Buan ! Ar c'harr !" eme e dad. Dougen a reas gant e vignon korf diskloset e vab betek diabarzh ar c'harr ma chomas astennet difiñv. Tomaz ne oa ket gouest da fiñval ivez. Sellet a reas ouzh ar c'harr o vont kuit, skodeget.

XIV. Kantren

Sur a-walc'h e oa bet kaset Leon d'ar medisin. Koulskoude e sante Tomaz ne dalveze ket ar boan gortoz distro e dad. N'en dije ken nemet lemel e dok ha stouiñ e benn. Gwelet en doa gwad o flistrañ dre skouarn Leon, ha ne gave ket dezhañ e c'hellfe parañ.

Marv e oa, en santout a rae.

Kregiñ a reas da gerzhout war-zu e di. Koupaia a oa o redek war e du dija : klevet he doa ar jav o vont kuit hag e felle dezhi gouzout perak, sur a-walc'h... Ket ! Pas Koupaia ! Pas Mammig ! Pas diouzhtu !

Treiñ a reas kein ha tec'hout kuit en ur redek ar buanañ ma c'helle. Redek a reas e-pad pell. Pa chomas a-sav, ne oa ket Koupaia war e lerc'h ken. Ne ouie ket perak en doa graet se. Faezh e oa. Kenderc'hel a reas da gerzhout dre greiz ar goadeg war-zu al lec'h ma kave dezhañ kavout ar stêr, rak ne ouie ket pelec'h e oa. P'he c'havas a-benn ar fin en em lakaas da heuliañ anezhi war-zu kêr. En em gavout a rafe nepell diouzh ar gêr mare pe vare.

Gant an tomm ma oa bet an hañv ne chome ket kalz dour en he naoz. Kavout a reas Tomaz aesoc'h tennañ e votoù ha kerzhet e-barzh eget treuziñ ar bodoù drein a heulie ar ribl.

Pell e kerzhas a-raok anavezout tro-war-droioù e di. N'en em sante ket prest da zistreiñ c'hoazh, koulskoude. Kenderc'hel a reas gant e hent. Red an dour dindan e dreid a sioulae e ene. Biken ne vefe re

ziwezhat da vamm pe da Goupaia klevet ar c'heloù...

O tostaat eus kamp an dermajied e oa. Emskiantek e oa bezañ droch o kerzhout e-barzh ar stêr evel-se, setu ma sellas tro-dro dezhañ. Ne welas den. Sioul e oa al lec'h. An holl oa aet da bourmen war a seblant. Kuitaat a reas ar stêr evit kerzhout war ar riblenn, a oa plaenoc'h diwar-neuze. E votoù-koad a chomas etre e daouarn.

"Tomaz !" a hopas ur vouezh plac'h.

Koulm an hini e oa.

XV. Koulm

Azezet e oa war ar c'hleuz, un dra bennak ganti war he barlenn. Serriñ a reas anezhañ buan, en ur sac'h lien a oa en he c'hichen.

"Tomaz !" a c'halvas Koulm en-dro, dre ma n'en doa ket fiñvet ar paotr. War-sav en em lakaas ha kerzhout davetañ.

"Pelec'h 'mañ ar re all ? a c'houlennas Tomaz.

- Du-se, evit lod. Da vamm... o wilioudiñ emañ.

- Koulm... o, Koulm... en em lakaat a reas Tomaz da zifronkañ, re leun e galon... Marv eo Leon, ha mammig zo o wilioudiñ...

- Shhh... shhh..." Koulm, hag a oa un tammig brasoc'h eget Tomaz, a zesachas anezhañ war he zu evit klask e frealziñ, ha d'e vlev e floure, dousik. "Gouzout a ran. Gouzout a ran ar pep tra-se. Arabat koll kalon, Tomaz... 'giz-se 'mañ kont..."

Sioulaat a reas Tomaz tamm-ha-tamm. Serr e zaoulagad, peg e skouarn ouzh bruched e vuiañ-karet, en em laoske da vont gant luskellerezh ar plac'h yaouank a oa krog da vouskanañ un ton kevrinus. Ur galon a oa o talmiñ start, daoust hag e hini e oa pe hini Koulm, peotramant e oant o-div o talmiñ a-unvouezh ? Ne ouie ket. Ijinañ a reas bezañ gourvezet war ur radell e kreiz ar stêr ha kaset pell, pell alemañ... En ul lec'h ma ne vefe ket kement a boanioù...

Ur bannac'h heol a zeuas da heskinañ e valvennoù hag a livas e orañjez hag e ruz diabarzh e

zaoulagad. Dispegañ a reas Tomaz a-dre divrec'h Koulm ha sellet outi, souezhet. Ur mousc'hoarzh kuñv oa ganti war he diweuz. En em deurel a reas outi endro :

"Da garout a ran, Koulm... Da garout a ran abaoe pell..."

N'he devoe ket amzer ar plac'h yaouank da respont. Tud a oa o tont en ur c'haloupat. Pellaat a rejont an eil diouzh egile a-raok ma tegouezhas Guiomar hag Alan, pennfollet :

"Koulm ! Deus buan ! War he gwentloù emañ Gaidou. Emañ an hini bihan o tont. N'eus plac'h nemedout amañ, kae d'he sikour e-pad ma redimp d'ar vourk..."

- Kae davet da vamm, eme Goulm war-zu Tomaz, a vouzh uhel. Ha goude, e kuzulik : deus amañ diouzh an noz. Gortoz a rin. Hag e ouzhpennas kreñv : lâr d'ar re all evit Gaidou !"

Un nebeud eilennoù war-lerc'h ne chome den war an dachenn.

XVI. Gortoz

E-pad ma rede war-zu e di e adwele Tomaz en e benn an devezh e oa o paouez bevañ. Leon 'oa marv. He mamm oa o wilioudiñ a-raok termen. Diskuliet en doa da Goulm e garantez. Ha Koulm ? Daoust hag-eñ e oa karet ganti ? M'he doa briataet anezhañ daoust ha ne oa ket dre druez nemetken ? Koulskoude eo hi he doa kinniget an emgav... Ne ouie ket re Tomaz petra soñjal. Ur meskaj a rannalon hag a spi, a reuz hag a garantez a oa ennañ.

Gwelet vo. Gwelet vo fenozh, a soñjas. Hag e klaskas kas Koulm kuit diouzh e empenn diwar-neuze, kuit da vegañ re a spi. E walc'h a zarvoudoù trist en doa da dalañ outo, ne dalveze ket ar boan ouzhpennañ se... Met meur a wezh e voe ret dezhañ distreiñ red e soñjoù, rak daoust d'e zoan gant marv Leon ha d'e nec'h gant e vamm e tremene skeudenn Koulm dirak e zaoulagad, dizehan.

Dirak e di e oa un engroez a dud o c'hortoz. Dre ma oa ar vamm o wilioudiñ e pezh nemetañ an ti, ne oa aotreet nemet ar merc'hed da zont e-barzh. Ha pas an holl, a soñjas Tomaz pa welas Sewa vihan o c'hoari en he c'hluchoù e korn al leur. Pelloc'h, dindan toenn ar c'harrdi, e oa e zaou vreur Tudi ha Telo oc'h heskinañ ul loen bihan bennak bet tapet ganto en ur sailh. Ar baotred all –e dad gant an amezeg, Eontr Anselm, Maodez gwaz Gaidou ha Korneli– a oa pe

azezet war skodoù bet lamet diwar ar bern keuneud, pe en o sav o kerzhout en ur dresañ kelc'hioù bihan. Ne oa ket nemeur a gaoz etrezo. An holl a savas o fenn pa erruas Tomaz.

"Leon ? a c'houlennas Tomaz gant e dad, dispi e vouezh.

Hejañ a reas e benn.

- Pelec'h ho peus lakaet e gorf ?

Gant e c'hroñj e tiskouezhas an ti.

- Gouzout a ra mammig neuze ?

- Ya, a respontas Maodez. N'eo ket bet evit gouzañv. Setu perak...

- Maodez ! a grias Tomaz trumm, deuet d'e benn en un taol ar gefridi en doa da seveniñ. Gaidoù zo war-nes gwilioudiñ ivez ! Koulm zo o sikour ! Ar baotred zo aet da gerc'hat ur vaouez kozh bennak er bourk...

Fiñval a reas an holl, divoredet.

"Kae daveti, eme Gadiou Bras da Vaodez. Ne servij da netra bezañ ken niverus amañ. Distroit holl. Keloù vo kaset deoc'h diwezhatoc'h."

Maodez a bellaas, herr warnañ, heuliet gant Añselm ha Korneli.

"Chañs vat, emezo.

- Ar re vihan 'vo evel gevelled all, a glaskas farsal Korneli. Ganet e vint dres er memes koulz !

- Ya, eme an tad. Dre chañs ne'm bo ket an daou da zesevel war un dro... Ur wezh zo bet trawalc'h din !

- Koulskoude 'oas kontant da gaout unan all."

Ne respontas ket diouzhtu Kadiou. An hini diwezhañ-mañ ne oa ket gortozet. Gouzout a ouient e vefe lakaet yec'hed Elena en arvar gant un dougen all. Deuet e oa koulskoude, ha ne oa ket d'e nac'hañ bremañ... Karet e vefe kenkoulz hag ar re all...

"Ya. Kontant on da gaout bugale. Kontant e vezan pa zeu unan all er bed. Atav.

Chom a reas didrouz ur pennadig. Den ne gredas komz, daoust ma oa ar memes skeudenn e penn pep hini. An tad eo a lakaas gerioù war ar skeudenn-se :

-... ha dreist-holl p'emañ ma mab henañ war ar varskaoñv".

Chom a reas o-unan an tad hag ar mab ur pennadig. Aet e oa an amezeg ivez. Labour 'oa war ar stern er gêr, ha dre ma ne vije ket echuet ar c'hrañj hiziv... Keloù vije kaset dezhañ diwezhatoc'h. Ar c'hevelled ha Sewa a oa o c'hoari asambles. Mammgozh an hini vihan eo a oa e-barzh gant Elena. Hi eo a oa ar verc'hig ganti e karg e-pad ma oa he mamm o tiskuizhañ. Hi eo a ziskennfe d'ar prad ganti bremaik. Setu perak n'o doa ket soñjet ar wazed kas anezhi ganto. Er c'hamp ne vije bet den evit ober war he zro ivez.

Grik ne ranne nag an eil nag egile. Troet e oant war-zu ar vugale, melkonius, en ur sellet outo o c'hoari. Balzam a lakae war o c'halonou gloazet, bezañ oc'h arvestiñ ouzh ar yaouankiz dichal ha disoursi-se.

Koantik oa Sewa, hag an daou vreur a rae war he zro gant damant.

"Tremen a raio mat an traoù gant ar babig, a soñjas Tomaz. Ar c'hevelled a sikouro". Bez e oa o vont da lâret se d'e dad kement ha troc'hañ an didrouz, pa zigoras an nor.

Koupaia a zeuas war-wel, heuliet gant Loeiza, ar babig mailhuret etre he divrec'h.

XVII. Kenavo, mammig

"Ma Doue, tadig... a grias Koupaia en ur lammat etre divrec'h e dad. He daeroù a oa o tiriilhañ war he divjod. Marv eo mammig, marv eo...

Plegañ a reas pep hini e chouk.

- Re wan e oa, eme Loeiza. N'he doa ket nerzhioù ken. Dre chañs hon eus gellet saveteiñ ar babig.

- Leon ar mintin-mañ, Elena bremañ... Kadiou a gomze en ur sellet ouzh al leur, stardet Koupaia ouzh e vruched. Daoust ha re evurus e oamp ? DAOUST HA RE EVURUS E OAMP ? a grias en-dro en ur sellet tro-dro dezhañ evel un den kollet e skiant gantañ.

Ne gomzas ket ken, stouet e gein, prenn e zremm. Difronkadennoù Koupaia 'oa an trouz nemetañ. Ar gevelled a dostaas, heuliet gant Sewa :

"Petra zo, Koupaia ? Trist out eo marv Leon ? Na leñv ket, Koupaia. Ni zo trist ivez ha ne ouelomp ket.

- Peta 'welomp ket ? a heulias Sewa a oa krog da zistripañ un nebeud gerioù.

- Mammig zo marv bremañ, eme Goupaia en ur sevel he fenn.

Chom a reas an tri bihan, digor o genoù war nav eur.

- Marv ? Mammig ?

- Ar mammoù ne varvont ket ! a enebas Tudi.

- Geo, mervel a reont, genaoueg. An holl a varv.

Ni ivez a varvo, a respontas Telo, avañsetoc'h war traoù ar vuhez.

- Kozh gaouiad kozh ! a huchas e vreur gevell. An dour a oa o sevel d'e zaoulagad. O vont d'en em gannañ e oant. Tomaz a daolas ur sell war-zu an ti. Digor oa an nor.

"Gall a rez mont, eme Loeiza. Lakaet 'm eus urzh. Da vreur zo e-barzh ivez.

- Deuit, paotred, eme Domaz dousik en ur gemer pep hini dre e zorn.

Kerzhout a rejont betek treuzoù an ti, heuliet gant Sewa hag a belloc'h gant Loeiza, he samm a vuhez etre he divrec'h c'hoazh.

- N'eo ket deoc'h d'ober war e dro, bremañ, eme Domaz dezhi. Ho merc'h zo o wilioudiñ ivez. Kit buan.

Ul luc'hedenn a anken a dremenas e daoulagad ar vaouez kozh. Sellet a reas tro-dro dezhi evit kavout un divrec'h degemerus evit ar babig. Kerzhout a reas war-zu Koupaia, hag a oa chomet da sikour anezhi an endervezh-pad. Honnezh a savas evit degemer ar pakadig kousket, a bokas da Loeiza :

"Mersi bras, moereb. Chañs vat du-se..."

Loeiza a bellaas a-dizh-bras.

"Paotr pe blac'h ? a c'houlennas an tad, raouliet e vouezh.

- Plac'h, eme Goupaia.

- Lenaig 'vo he anv."

En ti e oa Tomaz, Telo ha Tudi dija pa z'eas tre peurrest ar familh. An holl baotred o doa lamet o

zokoù hag a oa ganto etre o daouarn. Telo ha Tudi oa e-kichen penn ar vamm, o teurel selloù doaniet pe digred warni. Evel kousket e oa. Nemet e oa gwenn koar he dremm. Gwennoc'h eget boaz. Gwenn evel hini Leon, a oa ledet aze war an daol, warnañ ul liñsel ken gwenn all a c'holoe e gorf betek e c'hroñj. Didok e oa ivez.

Lenaig eo a gomzas da gentañ, en ur leuskel ur griadenn voan, heuliet gant unan all, hag unan all kreñvoc'h. Ar c'hriadennoù se a eztaole re vat santimañtoù pep hini rak taolenn vantrus an daou gorf marv-se, ha Tomaz a santas an dour o tont d'e zaoulagad.

"Petra zo, c'hoarig ? Tostaet e oa ar c'hevelled, kurius. O ! Gwelet 'peus ? Roufennet eo tout. Ec'h ! Pegen divalav ! Petra eo an euzh-e-welet-se ?

- Peoc'h, paotred, eme Goupaia. Tavet e oa ar plac'hig abaoe m'he doa lakaet Koupaia beg he biz en he genoù. Ret eo kavout unan da reiñ bronn d'ar babig-mañ, eme Goupaia en ur sellet ouzh e dad. A-hend-all ne bado ket pell ganti."

Den n'en doa soñjet e se c'hoazh. Ne voe respont ebet e-pad ur prantad. Pep hini a droe hag a zistroe frazenn Koupaia en e benn.

Digant Tomaz e teuas an diskoulm :

"Gaidou !"

XVIII. Beilhañ

Dre chañs e oa tremenet gwelloc'h an traoù evit Gaidou eget evit Lena. Yac'h e oa, kement hag he bugel, ur paotrig. Ne nac'has ket magañ Lenaig vihan asambles gant he Ronanig. An tad a oa bet o c'houlenn e-unan, e kenkaz... Met ur vaouez vat e oa Gaidou, n'he defe ket nac'het, Tomaz a ouie.

"E-giz-se e oar Koulm petra zo tremenet amañ bremañ, a soñjas. Kompren a raio ne zeuin ket."

Dibosubl-krenn e vije bet dezhañ fiñval forzh penaos. Gant kement a dud varv en ti e chom unan bennak war-sav diouzh an noz atav. Ha maouezed all eus ar barrez a oa deuet da bediñ ivez.

Pa voe lâret da Domaz ha d'e dad mont da gousket – tud a-walc'h a oa evit beilhañ – ne zeuas ket a-benn forzh penaos. An noz a-raok e oa Leon en e gichen, ha pa zihune diouzh an noz e kleve alan pep ezel eus ar familh, hini e vamm ivez. Ha bremañ oa e-unan en e wele kloz, ha ne glevfe ket e vamm gwezh ebet ken. N'en doa ket bet amzer da lavaret kenavo dezhi zoken...

Ur barrad kasoni a savas ennañ a-enep Lenaig. Ma ne vije ket deuet... N'eo ket, a soñjas. N'eo ket dre he faot, paour-kaezh bihan. Daoust hag-eñ he deus goulennet bezañ ganet ?

Diaes eo d'an holl. Da Goupaia ivez. Ne oa ket paouezet da leñvañ. Telo ha Tudi n'o doa ket diskouezet bezañ mantret kement-se, met sur mat e

vankfe mammig dezho ivez.

Ha Leon ? Tomaz a rae ur bern traoù gantañ. Atav en doa bet graet. C'hoari, deskiñ... ur breur hep e bar e oa. Gwezh ebet ne rae goap outañ, gwezh ebet ne laoske anezhañ e-unan p'en deveze ezhomm sikour... Penaos tremen heptañ diwar-neuze ?

Daoust hag-eñ o deus lavaret se da Vari ? a c'houlennas Tomaz outañ e-unan. Spi en doa ne vije ket dezhañ d'hen ober. Trist e oa eviti ivez. Atav en doa kredet e teufe da gaout he flas er familh. Ha bremañ 'oa c'hwitet. Da viken.

Moustrañ a reas Tomaz war ur c'hoant leñvañ a oa o pignat ennañ abaoe pell. Ret vefe din sevel, hag ober un dra bennak. Ma skrivfen ? Vad a rafe din. Ket, Leon a oa war an daol, hag ar c'homerezed n'o dije ket komprenet e emzalc'h. Sañset e oa bezañ prederiet gant ar re varv nemetken, sur. Just a-walc'h ! a soñjas. Abalamour da se eo e fell din skrivañ. Met ne oa ket posubl, hen gouzout a ouie. Tremen a reas an dorn dindan e vatarasenn pell koulskoude, koñfortet e vije gant dornata e gaier dija.

Kregiñ a reas da furchal. Ar follennoù. Ar voutailhad liv. Ar voestad pluennoù. Ar c'hreion koad a implije er skol... Ar c'haier. E gaier... ? Pelec'h oa hemañ ?

Santout a reas an enkreiz, ha neuze ar gounnar, oc'h en em silañ ennañ e-pad ma oa o klask e pep lec'h.

"Klevout a rit, poan o deus ar re vihan o

kousket...

- Ya, kompren a ran, soñjit 'ta, koll o breur hag o mamm war un dro... Hag ar plac'hig a chom ganto da zesevel...

- Bihan eo an daou baotr c'hoazh, pe oad dija ?

- C'hwec'h, ket ?"

Lakaat a reas Tomaz e daouarn ouzh e zivskouarn evit chom hep klevet ar peurrest. N'en doa ket ezhomm eus o zruez.

Da c'hortoz, kollet e oa e gaiet.

XIX. Klask war ar c'haier

"Ma c'haier ! a c'houlennas Tomaz gant Koupaia gant buanegezh kerkent ha ma c'hellas antronoz. Met tud estren oa en ti c'hoazh ha ne c'hellas Koupaia nemet kruzañ he divskoaz ha sevel he daouabrant e stumm pontoù moan, gant penn unan na ouie netra, ha na ouie ket eus petra oa kaoz zoken.

Diwezhatoc'h e savas e c'houlenn en-dro, en ur hejañ Koupaia un tamm, war ar porzh, pezh a reas dezhi teurel ur griadenn skiltr a lakaas div vaouez kozh da zeredek.

"Peoc'h, bugale ! Bezit doujañs evit an eneoù ! Alato, ar re yaouank ne zoujont da netra ken... " a c'hrozmoljont en ur vont tre adarre. Koupaia a chomas gant Tomaz :

"Petra zo peg ennout ? N'a ket mat ? N'out ket gouest da furchal da-unan ez kwele ?

- Aet eo ma c'haier kuit. Klasket em eus e pep lec'h. Gouzout a ran eo te. Ne oa ket nemet mammig ha te hag a ouie...

- Paouez 'ta glapez, petra 'mije graet anezhañ ?

- Te eo a gemere ar follennoù bemdez, n'eo ket ?

- Geo, eme Goupaia. Uuu... nann, gortoz 'ta.

Ne oa ket Tomaz evit anduriñ ur c'hortozadenn re hir :

- Piv, neuze ?

- Er fin eo ar plac'h, Koulm, aze, a zeue da gemer ar follennoù. Ne'm boa ket disfiziañs diouti. Ha laeret

vefe bet ganti ?

- Sot eo. Penaos he dije gouezet al lec'h ma oa ?

- Te eo ar sod ! Lâret em boa dezhi, evel just.

Kuit dezhi da c'hortoz pa ne vezen ket dibres...

Krog e oa Tomaz da gompren.

- Pet gwezh eo bet o kemer ar follennoù he-unan ?

- Ur wezh nemetken, Tomaz. Sur on. Ken grevus-se eo ?

Chom a reas Tomaz d'en em soñjal, mantret. Ne fellas ket dezhañ diskouez e from da Goupaia avat :

- N'eo ket, mat eo. Sur a-walc'h e oa faziet ha kemeret he doa anezhañ ouzhpenn d'ar follennoù. Mont a rin d'e c'houlenn..."

XX. An interamant

Gwall drist e voe an daou zevezh war-lerc'h. Ret e voe kas unan bennak da gemenn an interamantoù e pep lec'h.

Ur mor a dud en em gavas en iliz d'an deiz-se. Daoust ma ne oa ket tomm ar familh ouzh Doue e oa bet asantet gant an aotrou person lidañ an oferenn-gañv en e iliz. Skoet e oa bet tud ar barrez gant ar c'hañv doubl-se e ti ar re Gadiou. Ken kromm e oa deuet kein Kadiou Bras da vezañ ma oa krog an dud d'ober Kadiou Kozh anezhañ. Pe c'hoazh Kadiou an Intañv, pezh a oa gwasoc'h c'hoazh. Chom a rafe peg an anvioù-se outañ diwezhatoc'h. E-giz-se e veze an traoù.

Mignoned ar skol oa deuet : ar baotred a oa bet gant Tomaz e Prad-an-traoñ, pell a oa. Hag e vignoned a-viskoazh : Benead, Jos treut ha Tilin.

An dermajied a oa deuet ivez, war-bouez Gaidou, Sewa ha Loeiza, chomet gant an daou vabig er c'hamp. Spurmantiñ a reas Tomaz an hini a gare. Nemet n'en doe ket c'hoant sellet outi. Droug oa ennañ. Fellet a rae dezhañ sklaeraat kevrin ar c'haier.

Daoust ha tristoc'h e zleer bezañ war-lerc'h un interamant, pa ne vo ket gwelet korfoù ar re a gared ken ? Tomaz n'ouie ket. Eñ en em santas disammet, kerkent hag echu an oferenn. Kimiadiñ diouzh an holl dud-se, rannañ pred ar re varv gant ar familh, ha p'en defe kuitaet an ti an hini diwezhañ e vefe poent dezho

– e dad, eñ, Koupaia hag ar c'hevelled – ijinañ ur c'hempouez nevez, adkempenn ur vuhez... Mall oa gantañ. Setu e petra e oa o soñjal en ur zegemer saludoù an dud a oa o vont kuit an eil war-lerc'h egile, goude ma voe bet beziet e vamm hag e vreur.

"Te ! a c'hwezhaz da Goulm deuet betek ennañ.

Sellout a reas outañ gant he daoulagad bras ha fromus.

- Deus fenozh, a respontas e pleg e skouarn. Un dra bennak 'm eus...

- Goût a ran, a droc'has Tomaz, fulor kabestret en e vouezh. Penn-mouzh a reas Koulm en ur sellet ouzh al leur, lakaet diaes un tamm. C'hoant en dije bet Tomaz da skeiñ ganti. "Ne garin ket anezhi biken ken, a soñjas. N'hellan ket karout unan bennak a oar pep tra a soñjan. Lavaret e vo dezhi..."

Kontant e vefe d'ober droug dezhi.

"...dont a rin, a gendalc'has koulskoude. E pleg ar stêr."

Koulm a bellaas, da leuskel tud all da dostaat ouzh ar mab henañ nevez.

Ken mistr ha koant ha biskoazh e oa. Brav oa al liv du warni.

XXI. Koan e ti Kadiou

Tomaz a c'hallfe bezañ chomet serret war e boanioù, na soñjal nemet enno, chom er gêr da c'hortoz e yafe e c'hoant leñvañ da hesk.

N'eo ket se a zivizas ober koulskoude, bountet gant e dad ha Koupaia.

Un eskemm sirius kentañ o devoe da vare koan, deiz an interamant. Aet e oa kuit ar vizitourien ziwezhañ hag ar familh, daoust ma oa koazhet, en em gave unanet en-dro.

"Ne vint disoñjet biken, eme Goupaia, stag he sell ouzh he bolennad soubenn.

- Nann, chom a rint ennomp, sur, eme e dad.

- Me ivez a soñjo enno. Me ivez a gare mammig, ha Leon, a lavaras Telo ha Tudi kazi asambles, moan o c'halonou.

- Da nebeutañ n'em gavint ket o-unan er baradoz...

- Ret eo bevañ koulskoude, a gendalc'has Tomaz.

- Selaou, Tomaz, eme e dad, gwall brederiet... dav vo en em renkañ en un doare all, bremañ p'eo Leon...

E vouezh a dorras.

- Ya, tadig ?

- O, n'eo ket gwir ! eme Goupaia. Fellout a ra dit lavaret n'hello ket Tomaz mont d'ar skol ken ?

Bihan e teuas kalon Tomaz da vezañ en e vruched. Ne chome nemet bloaz a-raok ar santifikat,

hag e oa o vont da baouez...

- Se 'ni eo, merc'hig. N'eo ket dre ma faot... bras eo ar c'houmanant. N'hellan ket dont a-benn hep unan bennak da sikour.

Asantiñ a reas Tomaz gant e benn. "Ya, tadig, a zeuas a-benn da zisklipañ daoust d'ar skoulm en e c'houzoug.

- Forzh penaos, a gendalc'has Kadiou, e vo ar memestra evidout, Koupaia. N'eo ket evit displeijout dit. Ken ma vo Lenaig gant Gaidou ne vo kudenn ebet ; Telo ha Tudi a grogo gant ar skol e miz Gwengolo, ne vo ket re a labour en ti. Met pa zeuio an hini vihan en-dro... e vi evel he mamm, gouzout a rez ?

- Mat eo din, tadig. N'on ket plijet kement-se gant ar skol. Kontant vin d'ober war-dro ar babig. Evit Tomaz e vo diaesoc'h sur a-walc'h...

- N'eus ket da dortal. N'hellan ket gortoz e vo tapet e santifikad gantañ. Kreuviñ a rafemp gant an naon a-raok. Ker eo bet koustet din an interamantou, ouzhpenn."

Echu oa an diviz. En un doare rust, sur a-walc'h, met evit kuzhat e from eo e komze Kadiou e-giz-se. Keuz oa ennañ d'e vab, e gwirionez.

"Hag evit ar pezh-c'hoari, tadig ? a c'houlennas Tomaz c'hoazh, met ar respont a ouie re vat dija.

- N'eo ket echu ganit ?

- Labouret 'm eus kalz, met n'a ket buan... ur pezh labour eo, gouzout a rez...

- Rannet eo ma c'halon... a anzavas an tad goude un tav. ...Tremen a ri warc'hoazh da lavaret dezho n'hellez ket mont pelloc'h. Kompren a rint. En interamant e oant. ... emichañs e vo kavet unan all d'ober ez plas..."

Digomz e echuas koan.

XXII. Bale en noz

Digalonekaet naet e oa Tomaz.

Talet en doa ouzh ar marv, dir war e dal.

Diskred en doa bezañ bet laeret gant e zouzig.

Bremañ e oa ret dezhañ kuitaat an hunvre en doa lakaet ur pal d'e vuhez betek-henn : studial.

"Petra a chomo din e fin an hañv brein-mañ ?", a soñjas, c'hwerv. O kerzhout war-zu ar stêr e oa. En em laeret e oa kuit, didrouz, kerkent ha ma oa manet kousket an holl re all. Ne oa ket bet re hir, gant an nebeud a gousk o doa bet abaoe deiz skrijus ar marvioù...

Sklaer ha klouar e oa an noz. Miliadoù a stered a c'houlaoue anezhañ. Ne glevet netra nemet kaouenned ha raned, sarac'h an avelig er gwez ha trouz botoù-koad Tomaz war an hent. Tomaz ne wele ket an holl draoù-se. Koulskoude, ne bourmene ket alies diouzh an noz... Met re brederiet e oa.

"Gwelout a rez, emezañ en e benn, ma vijes chomet ez pije difennet ac'hanon... Met aze on man-unan, mammig, n'eo ket dre ma faot... Klevet 'peus ? Unan bennak a zle sikour en ti-feurm..."

"N'a ket mat ganin, a soñjas, skoet, hag e hejas e benn gant nerzh. Setu ma vezan o komz ouzh an Anaon. Marv eo mammig, ne gomzo ket ken. Marv, marv, marv... a lakaas da dreiñ en e benn evel pozioù ur ganaouenn. Ur ganaouenn gwall drist e oa, setu ma klaskas paouez da soñjal.

"Ha Koulm ? Petra a lârin dezhi ? Ret vo din adaptapout ma c'haier, kousto pe gousto..."

Trist e oa abalamour da se ivez. Ne gomprens ket perak he doa graet se.

XXIII. Dindan ar stered

Azezet e oa Koulm el lec'h ma oa pa oa degouezhet Tomaz goude marv e vreur. Ne fiñvas ket pa bignas Tomaz war ar c'hleuz, met sellout a reas outañ o tiskenn.

"Peus ket aon amañ, da-unan, diouzh an noz ? a c'houlennas Tomaz kement ha saludiñ. Ret mat e oa lavaret un dra bennak...

- Boazet on bremañ...

- Alies e teuez ?

- Abaoe un nebeud nozioù, ya...

- ...

- Bet on bet amañ bemnoz da c'hortoz ac'hanout, gouzout a rez ?

Toutek en em sante Tomaz. Sankañ a reas e zaouarn en e chakodoù. Dre chañs e oa kuzhet liv e zremm gant an noz, gwasoc'h vefe bet a-hend-all.

- 'M boa ket gellet dont...

- Goût a ouien. Met dont a raen-me memestra. E-giz-se oa unan bennak o soñjal ennout e-pad ma oas oc'h en em zifretañ er gêr...

Gwall fromet e oa Tomaz. N'eo ket evel-se en doa ijinet o emgav fenozh, atav... Petra en doa da lavaret, dija ?

- Dit eo an dra-se, a gav din ? eme Goulm en ur astenn e gaier dezhañ.

- Ya, eme Domaz... Met perak an diaoul... ?

- Ba... Na vez ket chalet, emezi goude ur prantad.

Den n'en deus lennet.

- Nemedout ! a rebechas, diaes ha garv.

- Den n'en deus lennet se, na me ivez, a bouezas Koulm.

- Perak, neuze ?

- Perak ne'm eus ket lennet ?

Ur c'hoarzh sec'h he devoe, a-raok respont gant ur goulenn all :

- Ma vijen bet gouest da lenn, e piv vije bet fiziet da labour dornskrivañ, d'az soñj ?

Rannet e voe kalon Tomaz gant ar frazenn ziwezhañ-se hag a oa torret war he fin : o leñvañ e oa Koulm.

Tomaz a astennas un dorn lent war he zu, a flouras d'he dremm.

- Na vez ket trist, Koulm... Kompren a ran... Ur fazi e oa... kemeret 'poa ar pakad a-bezh...

- N'eo ket se ! Ne oa ket ur fazi ! a laoskas Koulm etre div zifronkadenn.

- Petra neuze ?

Ne oa ket fachet Tomaz ken. Gouzout a ouie ne oa ket bet diskuliet e sekredoù, ne oa ket bet lennet e draoù gant Koulm. Ne oa nemet se a gonte evit poent. Ha korf klouar Koulm, aze, etre e zivrec'h, hag a oa da frealziñ...

- Soñj 'peus, Tomaz, pa oamp degouezhet aze, war ar blasenn ? Marteze 'peus ket soñj, met me 'm boa merzet ac'hanout. Daoust ha ne oas ket paotr bravañ an engroez ?

Souezhet e voe Tomaz : betek-henn en doa kredet ne oa nemetañ a gare anezhi ha neket ar c'hontrol. Ne oa ket boas da glevout seurt traoù ouzhpenn. Ne ouie netra diwar-benn e neuz.

- Kavout a rae din 'poa joa ouzhin. Setu perak e klasken pep degouezh evit dont du-se. Met ne oamp en em gavet asambles nemet ral a wezh... Da c'hoar eo a roe ar follennoù din. Ha me 'moa sec'hed dit, Tomaz... Me 'moa c'hoant da c'houzout muioc'h diwar da benn... Ur wezh ma oa okupet Koupaia gant ar c'hrampouezh he doa lâret din kemer ar follennoù manan ez kwele. Graet em boa. Ha kavet 'moa ar c'haier...

- N'eo netra, Koulm, sioul, sioul... N'on ket fached... Flourañ a rae Tomaz da zivrec'h e briñsez hag a oa o kridienniñ. Gant ar riv ? Gant ar from ?

- Bez e oan e-sell da adlakaat anezhañ en deiz war-lerc'h, marteze 'pije ket bet amzer da welet... Penaos 'mije divinet e oa... an holl draoù-se da c'hoarvezout ?

- 'Pije ket... Nann, n'eo netra, a lâran dit.

- Sellet 'm eus e-barzh memestra, a gendalc'has Koulm, disammet un tamm war-lerc'h he c'hofesion.

- Ma ?

- Pa oas erru ar wezh all, e oan o kontañ ped gwezh 'poa skrivet ma anv e-barzh. Goût a ran penaos vez skrivet. K.O.U.L.M., a zistagas, en ur ober van da skrivañ en aer boull.

- Ha betek pet out gouest da gontañ ?

- Tregont, eme Goulm. Skrivet 'poa muioc'h a dregont gwezh ma anv." (meur a dregont gwezh pe ouzhpenn tregont gwech ??)

XXIV. Ar vuhez nevez

Tamm-ha-tamm e adkemerar ar vuhez he lod war ar marv.

Tomaz a oa kendalc'het da labourat gant e dad : ret mat e oa echuiñ ar c'hrañj... Laosket e oa bet war-sav ar wezenn a oa bet kiriek eus marv Leon ; unan all oa bet troc'het en he flas. Buan e oa bet echuet al labour. An eost a oa o vont da gregiñ.

Bet e oa Tomaz o lavaret da Añselm e oa echu e damm labour-skrivañ gantañ. Degaset en doa en-dro e voestad pluennoù hag e follennoù gwerc'h, a restaolas dezhañ gant kerse. Hemañ oa bet gwall zipitet.

"Daoust ha ne oas ket paet ker a-walc'h, ma faotr ?

- N'eo ket se, eoñtr. Ma zad a fell dezhañ e labourin gantañ en ti-feurm. E plas ma breur...

- Mmm... kompren a ran, eme Añselm. Un druez eo alato, ur paotr ken donezonet... labour vat 'poa graet aze, Tomaz. Kontant bras e oamp o labourat ganit. Anavezout a rez unan bennak a c'hello kemer da blas evit echuiñ ar pezh ? Un toullad pajennadoù a chom c'hoazh..."

Tomaz a ginnigas Tilin. Ur skritur dereat en doa, daoust ma ne labourer ket ken buan ha Tomaz er skol. Ha Tomaz a ouie e vefe deuet mat an disterañ gwenneg a c'hellfe rastellat.

"Koulskoude, Tomaz, e kenkaz 'pefe c'hoant cheñch buhez... e kenkaz 'pefe keuz... Ur plas vefe

graet dit amañ er strollad. Beajiñ a rafes ganeomp, evel ma rae ar paotr a-raozout... Ouzhpenn en em glevomp mat...

Rannet e oa kalon Tomaz o klevet kement-se. Gouzout a ouie ne vefe ket posubl. Ne voe ket evit lazhañ pep spi diouzhtu, avat.

- 'C'h an d'en em soñjal, eotr Añselm. Ur respont vo roet deoc'h a-raok na z'afec'h kuit.

- Ne bado ket pell bremañ. A-benn fin an eostoù..."

O klask gouzout perak e chome an dermajied betek fin ar sizhun e oa Tomaz. Koulm he doa displeget dezhañ diouzh an noz. Mont a rae d'he c'haout ingal.

"Da betra mont kuit hep bezañ c'hoariet ? Daou akt, n'eo ket fall dija. Dre m'hor boa pleustret a-vuzul int kazi-prest bremañ. Un tañva eus ar pezh vo roet deoc'h disul, hag e-giz-se, pa dremenimp en-dro a-benn bloaz, e vo laouen an holl o welet ar fin...

- Met den ne oar !

C'hoarzhin a reas Koulm, lamponez :

- Ar vicher eo... Ma reomp bruderezh diouzhtu e vo diskaret hor raktres gant an aotrou person. C'hoarvezet eo bet meur a wezh. Ma c'hortozomp digwener pe disadorn e vo degemeret mat ar c'heloù o vezañ ma kloto an abadenn gant lidoù fin an eost ! An holl vo plijet o tont ! Ha ne vo ket amzer d'ar re zisplijet da deurel ac'hanomp er-maez !"

Laouen e voe Tomaz o klevout kement-se. E gwirionez en doa c'hoant bras da welet war al leurenn pezh en doa adkopiet.

Un dra bennak all en doa graet kalz a blijadur dezhañ : gouzout e teufe en-dro an dermajied a-benn bloaz. Ne zeuent ket ken alies diouzh boaz. Marc'hataet e oa bet kement-se gant e dad e-unan, dezhañ da adaptapout Lenaig vihan pa vefe gouest da zebriñ boued an holl... Ne oa ket bet dilezet ar plac'hig d'he magerez : Koupaia a yae bemdez d'he gwelet, hag an tad ur wezh ar sizhun, da Sul. E-giz-se n'en doa ket amzer da soñjal er sulvezhioù kent, ma chome da vutuniñ war ar bank asambles gant Leon.

Koulskoude ne oa ket trawalc'h da Goulm gouzout e teufe en-dro a-benn bloaz. Hi ne felle ket dezhi kuitaat he c'haredig. Ha ne oa afer ebet eviti da chom : touet en doa Añselm d'he zud war o zalaroù derc'hel Koulm gantañ betek he c'hwezhek vloaz echu. Betek-henn he doa sellet ouzh ar sarmant-se evel un dra vat, met bremañ p'he doa c'hoant da nijal kuit e oa krog da gavout ponner...

Setu ma klaske lakaat Tomaz da cheñch e vennozh ha da vont kuit ganti.

- Klevet 'peus koulz ha me, a lavare alies. Pedet out bet gant Añselm. Ur plas zo amañ evidout.

- N'hellan ket, Koulmig... N'hellan ket, gouzout a rez a-walc'h...

- Daoust ha ne garez ket ac'hanon ? a c'houlenne Koulm, ankeniet.

Goloet e veze neuze he divrec'h hag he daouarn a bokoù :

- Penaos e c'hellez krediñ se, ma c'halonig ? Biskoazh ne'm boa karet hini ebet nemedout... ha biken ne rin ivez !

Setu ma voe tavet war se betek an deiz war-lerc'h. Met bemnoz, etre daou bok, e teue an afer war spered Koulm en-dro. Bec'hiet e oa Tomaz, o vezañ ma ne gave diskoulm ebet d'ar gudenn.

E-pad an amzer-se e tremene Tilin aliesoc'h-aliesañ en ti-feurm. War zigarez dont da reiñ follennoù da Añselm, alies mat. Ne veze ket gwelet gant Tomaz bep tro. Sur e oa da gavout Koupaia avat, hag a oa oc'h ober war-dro an ti, ar c'hevelled pe al loened.

"Daoust hag-eñ emaout o vont d'en em staliañ amañ ? a c'houlennas un deiz d'e vignon, diwar farsal. Iskis e kave. Ar respont a sklaeraas e c'houlou avat :

- Piv oar ? eme Dilin, lakaet gwall ziaes en un taol, a-raok tec'hout kuit.

Koupaia ne oa ket ur plac'hig ken, a soñjas Tomaz. Pevarzek vloaz dija, ha krog da vezañ korfet kaer...

Ha me ? Daoust hag-eñ on un den gour bremañ ?

XXV. An east

Faezhus met laouen e veze an eostiñ. Ur mare gortozet gant an holl e oa, daoust ma veze ur pezh mell labour da gas da benn.

Labouret e veze asambles gant amezeien, met ur bern micherourien a gemere perzh ouzhpenn. Lojet e vezent e ti an dud, betek fin al labourioù. C'hoarioù hag ebatoù a veze diouzh an noz.

"Gwelet 'vi disul er pezh-c'hoari ? a c'houlenne ar baotred, da greisteiz, gant ar merc'hed deuet da zegas dezho peadra da evañ ha da zebriñ war ar park.

- Ya, evel-just", a respontent. En em renket e oant gant o mignonezed evit mont a-stroll dija, met pep hini a oa gantañ ar spi kuzh da c'hellout tremen ur prantadig gant he dousig...

Tomaz, eñ, ne wele ket Koulm da greisteiz, na ne ziskuizhe en he c'hichen da vare ar pennad kousk-aez evel ma rae Tilin ha Koupaia, da skouer, e disheol ur berniad kolo bennak. Dalc'het e oa tud ar c'hoariva gant *Krouidigezh ar bed* da vat. Ouzhpenn d'ar pleustriñ a raent abaoe daou viz e oa ret sevel ar c'hinkladurioù, ijinañ an efedoù dic'hortoz, aozañ ul leurenn ha mil tra na ouie ket Tomaz petra oant met a oa ret evit kas an abadenn da benn. Dre chañs, a soñje Tomaz, eo bet kemenet ha gwriet ar gwiskamantoù a-vuzul. Loeiza a ouie ar stek, ha sikouret e oa bet gant ur paotr yaouank eus ar strollad, Alan, a oa e-sell da vont war ar vicher kemener pa vefe skuizh gant ar

c'hoariva... Ma c'hoarvezfe un deiz bennak ! Paouezet e oa Tomaz da welet Koulm diouzh an noz evit ar sizhun : pep hini en doa ezhomm eus e holl eurvezhioù kousket. Koulskoude e soñje enni, kalz.

Tro un eur d'enderv e oa. An heol oa en e varr. Ne vefe ket adstaget diouzhtu gant al labour. Pellaat a reas Tomaz un nebeudig eus ar renkennad gwez-derv a vorde ar park. Eno o doa debret an holl en disheol. C'hoant en doa da vezañ e-unan. Da soñjal en e garedig, marteze. Da adwelet an nozvezh kentañ-se ma oa chomet ganti da sellet ouzh ar stered...

"Tomaz !

Tilin 'oa o redek war e lerc'h, heuliet gant Koupaia.

- Gortoz ac'hanomp 'ta !

Tomaz,, hegaset un tamm, a chomas a-sav da c'hortoz ar c'houbladig.

- Petra 'oa ? emezañ, rok.

- O ! O tirenkañ emamp ? C'hoant 'poa da ziskuizhañ, marteze ? a c'houlennas Tilin, divarc'het un tamm.

E don seven ne oa ket boazet Tomaz outañ : c'hoant a zeuas dezhañ da c'houzout hiroc'h. Koupaia he doa ur min kevrinus ivez. Un tammig a-dreñv he mignon e chome, lentik. Mouezh Tomaz a denereas :

- 'Moa ket, nann. O vont da bourmen e oan. Dont a rit ganin ?

- Gant plijadur, Tomaz. Marteze e c'hellimp kaozeal eus traoù a sell ouzhimp...

Pellaat a rejont o-zri a-hed ar c'hleuz.

XXVI. Tilin ha Koupaia

"Da gentañ, a grogas Koupaia, hon eus ur pec'hed da anzav dit.

- Añ ? ... ? Tomaz a zistroas evit sellet ouzh an daou all, alvaonet. Manket ho pefe... dija ?

Tilin ha Koupaia a zirollas da c'hoarzhin. Ne zlee ket bezañ se. Ma ! a soñjas Tomaz, gwell a-se. Lenaig n'eo ket deuet en-dro c'hoazh ha piv a zesavo anezhi ma n'eo ket Koupaia ?

- Ket, n'eus netra da welet gant se, a lavarjont asambles.

- Petra, neuze ?

- Tomaz, gwelet hon eus out prederiet abaoe ur prantad. Gouzout a ran eo bet diaes evidout er maremañ, eme Goupaia...

- Ya...

- Met soñjet 'm eus e tlees bezañ tregaset gant un dra bennak all. Setu m'em eus heuliet ac'hanout un nebeud deizioù zo, diouzh an noz...

Tomaz a ouie ar pezh a oa o vont da lavaret dezhi : gouzout a rae evit Koulm hag eñ.

- Ha neuze ? a droc'has. Me a oar e vezit asambles, Tilin ha te, ha n'an ket da spiañ ac'hanoc'h...

- Na vez ket chalet, eme Dilin gant douster. Gant Koupaia e oan en noz-se. N'oamp ket chomet da sellout ouzhoc'h...

- Petra zo, neuze ? Dibasiant e kroge Tomaz da vezañ, o soñjal er pezh o doa gellet sourpren. Displijus

e kave bezañ diskuliet e sekred a-wel d'an holl.

- N'hon eus klevet nemet un draig... Ni felle deomp gouzout... Leuskel a ri Koulm da vont kuit ? Pe emhout e-sell da vont ganti ? Peotramant lakaat anezhi da chom ganit ?

Tomaz ne respontas ket, enket.

- Gouzout a rez a-walc'h, Tomaz... Arabat fuloriñ... Soñjet hon eus en un dra bennak a c'hellfe sikour ac'hanout.

- Petra ? a c'houlennas Tomaz, re vuan. Ar spi a oa o tiwan ennañ adarre.

- Daoust ha ne oas ket e-sell d'ober studioù ? Tremen da santifikad ? a c'houlennas Tilin.

- N'hellan ket, gouzout a rez a-walc'h. N'eus ket amzer ken, gant al labour en ti-feurm gant tadig...

Koupaia a oa he dorn en hini Tilin.

- Ne welez ket petra a faot din ober dit kompren, emezi, difonn ?

Tomaz ne respontas ket. O sellet outo e oa.

- Daoust ha n'eo ket Tilin ul labourer a-zoare ?

Tomaz a sellas outañ penn-kil-ha-troad evel pa welje anezhañ evit ar wezh kentañ. Tilin a gomzas d'e dro, lakaet diaes un tamm anezhañ.

- Soñjet hor boa... Da erlec'hiañ a c'hellfen ober, me, Tomaz... Pa vimp bras a-walc'h da zimeziñ Koupaia ha me...

- Lâret ho peus da dadig ?

- Pas c'hoazh. N'ouzomp ket re penaos... Marteze e c'hellfes sikour ? Aes vefe dit bazhvalaniñ...

- Selaouit, c'hwi ho taou. Laouen on evidoc'h. Ne'm eus netra a-enep ho timeziñ. Met ne welan ket penaos e c'hellan-me sikour ganeoc'h !

- Eo, evel-just ! a adkemeraz Koupaia. Emaomp o vont d'en em fiziañsiñ ar buanañ ar gwellañ. Te chomo er gêr da sikour tadig e-pad bloaz c'hoazh, amzer d'an dud d'en em ober. War-lerc'h e timezimp. Ha te a c'hello mont d'ar skol en-dro, da dremen da santifikad.

-... ha pa vin gouest da vezañ skolaer, e teuio Koulm en-dro, e timezimp hag e savimp lojeiz asambles...

Lavaret en doa se en ur sellet ouzh an oabl digatar, hag e zaoulagad oa o lugerniñ kement gant an heol ha gant al levenez.

- O, Tilin... ha kavout a ra dit e c'hellfe bezañ ?

- 'Peus ket 'met en em glevout gant Koulm."

Poent bras e oa tapout krog el labour en-dro. Stouiñ a reas Tilin war-zu Koupaia da bouchañ dezhi.

- Ken tuchant !

An daou baotr a zistroas d'o labour en ur redek : o c'hortoz e oa ar re all.

XXVII. Ar goulenn

An devezh-pad en doa soñjet Tomaz e kinnig Tilin ha Koupaia. Ma gemerfe Tilin plas Leon, e vefeñ libr da heuliañ e blanedenn, da vont da skolaer pe da skrivener pe me oar...

Diouzh an noz ne voe ket evit kousket, daoust ma oa brevet e gorf. Ne zistanfe ket e spered a-raok bezañ komzet gant Koulm. En em laerezh a reas goude ma oa manet kousket an holl.

"Gant ma vo war-sav c'hoazh, a soñje war an hent.

N'en doa ket d'en em chalañ evit-se : o paouez echuiñ e oa ar bleustradeg pa erruas. Pep hini a oa o kimiadiñ, ha tud ar c'hampad a oa o prientiñ o nozvezh. Dont a reas a-benn da zesachañ evezh Koulm o c'hwitellad un ton a anavezent o daou.

"Me gave din ne zeufes ket betek fin ar sizhun ? a c'houlennas-hi, souezhet. Ma, laouen on o welet ac'hanout."

"Kou-oulm ? Pelec'h emhout ?"

Unan bennak oa o c'hervel anezhi.

– Kae da gichen ar stêr... evel boaz !" a c'hwezhas en ur dec'hout.

Tomaz a yeas da skoachañ el lec'h merket hag a c'hortozas ur c'hard- eur bennak en noz, puchet dindan ar stered, o klask frazennoù kendrec'hus da c'hounit e briñsez...

Trouz he c'hammedoù skañv a zeuas betek ennañ.

- Aze emhout ? a chuchumuchas. Eus tal an tan e teue, ne wele ket mat en deñvalijenn c'hoazh, daoust ma ne oa ket du-pod an noz.

- Ya, a respontas Tomaz war ar memes ton.

Mont a reas betek ennañ a-dastorn ha flourañ d'e zremm.

- Deuet out, neuze ? Deuet out ? Penaos e tremen an eost ? N'out ket re skuizh ? a c'houlennas Koulm, o skrijal gant al levez.

- Derc'hel da vont, eme Domaz en ur vousec'hoarzhin." Met Koulm ne c'helle ket gwelet anezhañ, gant an noz. "Sell, Koulm... Degaset 'm eus un dra bennak evidout..."

Pa oa deuet ar pilhaouer ar wezh all en doa bet kalz traoù da reiñ dezhañ : dilhad re gozh da vezañ gwisket en-dro... hag a oa bet d'e vamm pe da Leon... ouzhpenn d'ar pladoù ha d'an traoù bet dibabet gant Koupaia en doa goulennet kaout ur brav a c'houriz ruz, brodet a berlez.

- C'hoant 'm oa da c'houzout... Ha kontant 'vefes da zimeziñ ganin, Koulm garet ? a c'houlennas en ur silañ ar gouriz en he dorn.

Ur paper gros a rae an dro dezhañ. Divouezh ha bamet e chomas Koulm e-pad ma oa o tigeriñ ar pakad. He daoulagad, boazet, a wele gwelloc'h bremañ. Hag he bizied a sante mat...

- O, Tomaz... petra eo ? Ur gouriz ? Na pegen brav e tiskouez bezañ... Perlezennoù zo outi...

- Danvez ruz eo, a spisaas Tomaz. Gouzout a ran e plij dit al liv ruz...

Laouen-holl e oa Koulm. Ken laouen m'he doa disoñjet respont. Dleout a reas Tomaz sevel e c'houlenn en-dro.

"Dimeziñ a ri ganin ?" a c'houlenas a-raok pozañ e vuzelloù ouzh he re.

An doare m'en em laoskas da vont outañ a oa kement hag asantiñ.

Sur mat he dije respontet fraezh dezhañ, ma ne vije ket savet cholori eus tu an teltennoù. Ur babig oa en em lakaet da vlejal, eilet dizale gant un all, hag a-raok pell e voe klevet ivez mouez skiltr Sewa bet dihunet e kreiz un hunvre gant ar re vihanañ. Koulm a lammas war he zreid :

- N'hallan ket chom pelloc'h... Merzet vefe... Ezhomm 'vez diouzhin pa reont se !

- Met pegoulz... ? a zistagas Tomaz, disaouzanet.

- Disul, 'vel-just ! Gant ar pezh-c'hoari !"

Sellout a reas outi keit ma steuzie en deñvalijenn. En ur redek didrouz e sache hag e skoe war he dilhad noz d'o lakaat kempenn. Kuzhat a reas ar gouriz en he c'horfenn a-raok erruout dirak an deltenn.

Chom a reas Tomaz da hunvreal war ar c'hleuz, e c'hroñj en un dorn, e-pad ma oa egile o tennañ ar geotennou a oa dindan e vizied.

Daoust ma oa sioulaet buan ar re vihan e chome tud da chuchumuchiñ du-hont. Poazh o c'hortoz en aner e adkemeris Tomaz penn an hent.

Disul. Disul a zeu e vefe roet da c'houzout d'an holl e oa en em glevet gant Koulm !

Aloubet e oa gant al levnez. Un dra bennak a starde e galon koulskoude.

From, moarvat...

XXVIII. Sevel ha kinklañ

"Selaouit mat komzoù Doue, ma breudeur, eme an aotrou person diwar lein e gador-brezeg.

Klevet em eus e vefe c'hoariet pezh er bourk en enderv-mañ."

Maouezed an iliz a eskemmas selloù a-gorn, hep treiñ o fennoù. Piv an imobil a oa bet o flatrañ an drase e kofes? Meur a hini, moarvat. Kement ha gwalc'hiñ o c'houstiañsoù. Ha kemend-all a vefe graet war-lerch, goude bezañ gwelet ar pezh-c'hoari, e mod-se 'vefe pardonet...

"Tud zo a glask ho touellañ, dre implijout istorioù kaer eus ar Bibl evit desachañ ac'hanoc'h war-zu o c'hoarioù diroll.

An aotrou Doue n'houl ket e vefe skignet e vouezh en doare-se avat...

Chomit er gêr en enderv-mañ, ha dalc'hit ho pugale ganeoc'h!"

Tro ar re-se da eskemm selloù a-gorn en ur gammañ o begoù un tamm. Na Doue na diaoul ne virfe outo da dec'hout eus o zi da vare ar pezh, evel-just!

Ite missa est... a ganas merc'hed bihan ha krignerezed treid sent al laz-kanañ war un ton skiltr, o reiñ dre se aotre d'an holl re all da skuilhañ didrouz dre an nor-dal.

Pa zeuas o zro, e fin ar ganaouenn, ne chome den

war ar blasenn. Pep hini a ouie a-walc'h ar pezh en doa da gas d'an ostaleri ma vefe roet ar pezh dizale. Unan lienaj, unan dilhad, unan un tok, ur gleuzeur, un trebez... Pep hini en doa kinniget un dra bennak da reiñ an dorn.

"Ha neuze, Kain, Abel, prest evit an abadenn? Adwelet 'peus ho pozioù? a c'hoarzhe ar wazed en ostaleri, en ur baeañ forzh banneoù d'ar baotred yaouank a oa bet enrollet evit ar c'hoari. Ne oant ket prest da vezañ galvet dre o anvioù-badez ken... ar re-se a chomfe peg outo gant ar gloar o defe bet oc'h en em ziskouez war al leurenn d'an deiz-se.

Stardetoc'h ar wazed eget boaz, en ostaleri. Krog e oad da brientiñ al leurenn, dirak daoulagad bamet ar vugale ha sell fumet an aotrou person, chomet e-unan da vallozhiñ an dermajied dindan porched e iliz.

Degaset e oa bet daou garr hag a oa bet lakaet an eil ouzh egile dirak prenestroù an ostaleri. Ar c'here en doa pourvezet plenk, a oad dres o renkañ kichen-hakichen war ar c'hirri da gaout ur plañchod kempenn a-walc'h. Daou zen oa oc'h eren anezho gant kerdin a bep tu. Pintet war skeulioù koad e oa gwazed all o kinklañ an dekor. Liñselioù oa bet stignet ouzh kerdin dirak ar voger, d'ober ur foñs. Un den a zifoupas eus an ostaleri en ur jestraouiñ war-zu an nec'h:

- E, Jos, noziñ a ra e-barzh!

C'hoarzhadeg. Savet e voe al liñselioù en doare ma ne vefe ket mouchet ar prenistri a-raok d'an dud bezañ peurlipet o banneoù.

Merc'hed bihan, karget o divrec'h a vrankoù deliennek hag a vokedoù, a oa o c'hortoz e-harz al leurenn ma vefent staget ouzh al liñsel. Reoù all o doa degaset boulloù pardon bet diskroget eus o gweleoù-kloz hag a adkemerfent e fin an abadenn.

A bep seurt traoù e oad o renkañ dindan ar c'hirri, evezhiet pizh gant Añselm :

- Ar bailh a servijo war-lerc'h an dra-se... Gall a ra bezañ lakaet e foñs... Ya, met diaes e vo da dapout pa vo poent, ne vo ket kalz a amzer... Gwelomp hag-eñ e c'hell bezañ lakaet e-kichen dor an ostaleri, da c'hortoz ! Petra 'peus degaset, te ? A, deuet out a-benn da amprestiñ ur stol gozh... Mat kaer. Ur sapre neuz en do Doue gant se... Nann, n'eo ket ur gwall afer e vefe roget un tamm. Ne vo ket gwelet eus a-bell. M'hor bez amzer e vo adkempennet bremaik. Dal, lak se amañ... emezañ d'ur c'holist bet o vizitañ armel ar sekreteri e kuzh. Ha te, Abel, n'eus kroc'hen loen ebet ganit a lârez ? N'eus ket fellet dezho reiñ dit ? Gortoz, goulennet vo gant unan all...

- Me 'meus ur jiletenn graet gant blev lapined. Flaer zo ganti un tamm, met marteze e klotfe a-walc'h gant ar perzh ?

- Ya, sur. Gall' a rez degas se diouzhtu ? Ma ne vez ket graet pep tra en urzh vo disoñjet, war-lerc'h.

Ha kuit ar paotr, e-pad ma kendalc'he Añselm gant e labour dibab ha dasparzhañ an dafar.

XXIX. Krouidigezh ar bed, Aktoù 1 ha 2

N'en doa ket gellet Tomaz erruout a-raok ma krogfe ar pezh : goude kreisteiz oa bet o sikour Koupaia da renkañ an ti ha d'ober war-dro ar c'hevelled, mil inervet gant ar pezh a oa da c'hoarvezout. Int a yafe da sellet ouzh ar pezh-c'hoari ivez ! Ha m'en doa treuzet spered Tomaz mont d'ar red d'ar bourk a-benn en em gavout abretoc'h gant Koulm, e voe mouget e soñj just pa oant o treuziñ an nor evit mont kuit. E dad oa o tiskregiñ e dok boulouz diouzh e grog.

"Dont a rez ivez, tadig ? a estlammas an holl. Hini ebet n'en doa soñjet kinnig dezhañ. Abaoe ar c'hañvoù ne oa ket troet da ebat.

- Evel-just, a respontas koulskoude. Ul luc'hedenn a fent a skedas en e zaoulagad. Ne oa ket ur mousc'hoarzh gwir, met ar gwellañ hini abaoe an interamantoù memestra.

Ar familh a-bezh eo en em lakaas en hent neuze. Laouen.

VENI CREATOR... a gleved eus a-bell, kanet gant an holl. Fromus oa ar c'han. Ne oa ket tamm ebet evel pa veze kanet e penn kentañ an ofisoù. Muioc'h a lañs, a galon, a oa d'an deiz-se. Muioc'h a dud eget ne oa bet en iliz-parrez biskoazh, ivez ! Heñveloc'h e oa ouzh ur pardon kentoc'h. Ur gouel, sklaer hag anat. Buan e tostaas ar familh. Telo ha Tudi en em silas e-

touez an engroez evit tizhout ar renkennadoù kentañ : gant ar mor a dud a oa hag ar bihan ma oant, n'o defe gwelet netra a-hend-all.

Pozioù diwezhañ ar ganaouenn a nijas war-zu an oabl, douget gant mil ha kant mouezh.

Un didrouz leun a spi en em stalias.

Trumm e tifloupas un den eus a-dreñv ur rideoz. Tomaz a anavezaz Maodez : ar prolog e oa anezhañ. Bez e oa o vont d'ober ul liamm etre ar pezh hag an arvesterien, da zisplegañ an traoù diaes... Gant ur vouezh kreñv e krogas da ganañ, e-unan, gwerzennoù kentañ ar pezh. Ne glevet ket mat e bozioù eus al lec'h ma oa Tomaz, Koupaia hag o zad, met ar ster dre vras 'oa aes da entent. Trugarekaat a reas an dud a oa deuet niverus. En ur bilpasat war al leurenn evit bezañ klevet gant pep hini e talc'has da werzenniñ evit kontañ ar pezh a vefe kavet en akt kentañ. Tomaz a ouie mat eus petra oa kaoz, goude bezañ adkopiet pep tra, met an dud all ne oant ket kollet ivez, dre m'o doa holl un anaoudegezh don eus ar Bibl. Koulskoude ne rannet grik. Aketus e selaoued.

Echu gantañ e ginnigadenn, ar prolog a stouas hag a guitaas al leurenn hep treiñ kein ouzh an arvesterien.

An Aotrou Doue, barvek hardi, a zeuas en e lec'h dizale. Piv e oa dija ? Ne oa ket tu d'e anavezout gant e dreuzwiskamant. A ya, Añselm, a gounaas Tomaz pa glevas e vouezh. Eñ ivez a grogas da ganañ

gwerzennoù en ur vont eus un eil tu d'egile d'al leurenn. Krog 'oa ar pezh da vat.

Dispourbellet oa daoulagad Tomaz, evel re an holl, war-zu an aktour. Sed ma reas ul lamm gant ar souezh pa santas unan bennak o skeiñ war e skoaz. Koulm 'oa erru betek ennañ hag a oa oc'h ober sin dezhañ dont d'he heul.

Hini ebet ne verzas e oant aet kuit.

XXX. Fachiri

Mont a rejont war-zu an iliz hag harpañ ouzh ur voger. Serr oa an dorjoù bras met da bariañ vefe e oa ar person o sellet ouzh ar pezh-c'hoari diwar lein ar c'hloc'hdi ! Ne oant ket skoachet, met den ne selle outo, peg selloù an holl ouzh an arvest.

Koant-tre e oa Koulm gant he dilhad Sul. Briata a reas Tomaz e vuiañ-karet ha bouchañ dezhi gant karantez.

Pa zistardas dezhi e astennas Koulm dezhañ un dra a oa deuet ganti en he dorn. E-pad ma oa o rogañ ar paper, puchet war al leur, e lañsas Koulm an diviz.

"Neuze eo graet da soñj ? a c'houlennas. Dont a ri ganeomp ?

Meizañ a reas Tomaz e fazi : treuzkomprenet he doa Koulm. Eviti e oa anat en doa divizet chom ganti, ha neuze heuliañ Añselm hag e dud, evel ma c'houlenne Koulm e rafe abaoe pell.

- O, Koulm... Ma digarez, met n'eo ket se 'moa c'hoant da lavaret... emezañ pa gredas sevel e zaoulagad war he zu. Ne oa ket peurzigor e brof met n'eas ket pelloc'h, mantret rak penn-moukl e zousig. Pozañ a reas e bakad ha desachañ anezhi betek ennañ evit displegañ dezhi e zezo : gortoz bloaz, eurediñ war-lerc'h...

Met daoust d'ar flouradennoù e oa reutaet korf e vignonez, ha pa zeuas Tomaz a-benn da groaziañ sell Koulm e oa daeroù o lugerniñ ennañ. Krog oant da

ziskenn, didrouz hag herrek, a-hed he divjod, a-raok mont da c'hlebiañ boulouz he c'horfenn. Dilavar e chomas Tomaz neuze, skoet.

"Lâret 'poa e kares ac'hanon, a zifronkas Koulm. Ha bremañ... O vesteodiñ e oa gant ar from hag an dipit... Bremañ e tiskrogez diouzhin !

- Ne gomprennez netra neuze ? a daolas gant kounnar. Ne ouie ket penaos frealziñ Koulm. Estregedout a zo ! Kinnig a ran dit gortoz bloaz ! Bloaz ! N'eo ket ur beurbadelezh !

- Perak ne fell ket dit dont ganeomp ? a gendalc'has Koulm, aheurtet. Piv oar war be du e vo troet da galon a-benn bloaz ?

- Ne fiziez ket ennon, se 'ni eo !

Tevel a rejont trumm : an engroez oa o fiñval, an dud 'oa en em lakaet holl war o zaoulin, evel pa vijent o pediñ gant feiz. Ha marteze a-walc'h e oant oc'h ober. Dizale ez ejont holl war o sav adarre. Neudenn an diviz a adskoulmas :

- Geo, hiziv e ouzon ne livez ket gevier, a gendalc'has Koulm hag a oa o klask mestroniñ he from. Daoust da se e oa he diweuz o krenañ un disterik, tre evel e vouezh. Met warc'hoazh, petra 'vin evidout ? An amzer a ra e dro...

Inervet e oa Tomaz. N'eo ket e-giz-se en doa raktreset displegañ se dezhi. Kredet en doa e vefe laouen. Ha bremañ oa o leñvañ. Santout a rae ar gounnar ennañ, ne oa ket evit he c'habestrañ.

- Nul eo ! N'hellan ket dilezel ma familh, pas

bremañ ! Te 'peus ket hini ebet, n'hellez ket kompren. Met me, n'hellan ket plegañ d'az polontezioù holl !...

Feuket, Koulm a lammas war he zreid. Tec'hout a reas kuit war-zu an engroez hag e steuzias e-barzh.

Hep sellet outañ e tastumas Tomaz e bakadig hanter-zigor war al leur hag e fourras anezhañ ouzh e vruched dindan e roched.

N'en doa ket c'hoant ken da c'houzout ar pezh a oa e-barzh, evit poent.

Ha ma vije bet ur plac'h, en dije leñvet a-walc'h.

XXXI. E-unan

Ur gloaz a loske kalon Tomaz.

Ne ziskouezas netra er gêr, na ne lâras ne oa ket chomet betek ar fin. Selaou a reas ar re all o kontañ ar pezh dre ar munut, leun a virvilh. Gant al leun ma oa o fennoù goude an arvest, ne voe ket merzet penn-mouzh Tomaz hag e voe aes dezhañ kuzhat e c'hlac'har.

Nac'hañ a reas mont da Brad-an traoñ an deiz war-lerc'h evit kimiadiñ diouzh Lenaig, koulskoude. An dermajied, echu o c'hefridi ganto, a oa war-nes mont kuit da heul o flanedenn...

En ur lakaat urzh el lab hag er c'hraoù e oa oc'h en em soñjal. Emskiant e oa da vezañ koufonet e chañs. Pep tra en doa degaset un tammig spi hag un tammig levenez en e hañvez a oa bet breinet gant an trouz 'oa savet Koulm hag eñ en derc'hent. Ur lutig ouzhpenn oa o paouez bezañ c'hwezhnet en e vuhez, ha ne gave ket dezhañ e vefe tu d'he zanañ en-dro. Pegoulz o defe ? Ne'm welfent ket ken.

E galon a wade, e zaoulagad a chome sec'h.

Krog on da vout ur gwaz, a soñjas gant c'hwervoni.

Chom a reas pell Koupaia, e dad hag ar baotred gant an dermajied en enderv-se. Klevout a reas Tomaz anezho o tont eus a-bell, o kanañ ma oant a-bouez-penn war an hent, holl asambles, un ton bet klevet

meur a wezh er pezh-c'hoari :

*Kerzh kuit Agar, d'an dezerzh kerzh
N'houlan ket desevel da vab
Kerzh kuit Agar, d'an dezerzh kerzh
Petra a raio din ma varv ?*

Fest a oa bet, anat ! Laouen e voe Tomaz o welet e dad ken disoursi : da nebeutañ en defe servijet d'un dra bennak e labour-hañv !

Koupaia a gontas dezhañ o endervezh gant birvilh, e-pad ma oa ar soubenn o tommañ. Sikouret o doa evit diskar ha plegañ ar c'hamp. An dud yaouank o doa c'hoariet er pezh a oa deuet e-kerzh an enderv, evet ha dañset e oa bet.

Daoust hag-eñ he deus dañset Koulm gant paotred all ? a soñjas Tomaz, c'hwerv. Ne savas goulenn ebet ouzh Koupaia avat.

"Prometet o deus dont da echuiñ ar bloaz a zeu, ar pezh a vo c'hoariet penn-da-benn neuze ! a zisplegas honnezh, sikouret trouzus gant he breudeur vihan.

"Evit Lenaig, Gaidou zo mat dezhi magañ anezhi hag ober war he zro betek an hañv a zeu. A-benn bloaz e vo kreñv ha gouest da zebriñ boued an holl... er gêr ! En em renket eo tadig ganti war ar priz.

– Mat eo, a laoskas Tomaz etre e zent, kement ha respont ur wezh an amzer. O klask gouzout e oa hag-eñ n'he doa ket lâret Koulm un dra bennak evitañ. Koulskoude ne ouzhpennas netra.

– Ha, ya, an holl oa souezhet ne oas ket deuet.

Karet o defe lâret kenavo dit o-unan !

Roufennet oa korn daoulagad Koupaia. Geo, Koulm he doa lâret un dra bennak evitañ. Met n'helle ket reiñ se da c'houzout dezhañ dirak an holl...

– ... 'fin, a echuas, ne oant ket prest da loc'hañ toutafed. Ma 'peus c'hoant da vont d'o saludiñ e c'hellez mont da c'hortoz er bourk. Ur seurt dibunadeg a rint o vont kuit.

– Pegoulz 'ta ? a c'houlennas Tomaz gant re a herr. Keuz a vagas kerkent. Met e dad n'en doa ket merzet 'toare.

– 'Peus ket 'met mont diouzhtu. Derc'hel a rin da volennad rata war korn an oaled, a echuas Koupaia.

Kuitaet en doa ar sal a-raok n'en defe bet den amzer da enebiñ.

32. Aet int !

Redek, redek dizehan.

Da gentañ tout e tremenas Tomaz dre Brad-an traññ. Mantret e voe gant ar gwel eus ar park, breset ha melenet ar geot ennañ a-dachadoù. Gorrekaat a reas ha straniñ ur pennadig etrezo war-c'hed eus un dra bennak he defe laosket evitañ, ur bitrak bennak a zougfe he merk...

Mouget oa bet an tan, ne save ket moged dioutañ ken. O tremen e zorn dreist ar bern ludu e santas Tomaz klouarijenn c'hoazh. Evel un den o kousket, e galon a dalm... a soñjas.

Amañ e kouske, a soñje, en ur gerzhout el lec'h ma oa bet he gwele.

O hediñ ar c'hleuz e welas al lec'h m'en doa diwriziennet takadoùigoù geot diouzh an noz. D'ar mare-se... karout a rae ac'hanon c'hoazh, a soñje Tomaz, leun a hirnez. Ha debret gant ar velkoni e voe darbet dezhañ azezañ war ar c'hleuz hag en em lakaat da ouelañ.

Ne reas ket avat. Daoust ha n'he doa ket lâret Koulm, dre Goupaia, en doa da vont fenozh er bourk ? Marteze ne oa ket koll pep tra. Marteze 'vefe moien adskoulmañ ganti, marteze 'vefe pardonet....

Kuitaat a reas ar park a-raok kregiñ da redek war an hent adarre.

"Gant ma ne erruin ket re ziwezhat !"

33. An dibunadeg

Kement a dud a oa barzh ruiou kâr ha gant ar rogasionoù pe gouel Doue ! Diaes e oa krediñ e oa koulz ar pred. Hiziv avat ne oa petalenn ebet war ar pavez.

En em silañ a reas Tomaz e-touez an dud. Hini ebet ne daolas evezh outañ.

O tremen e oa dibunadeg an dermajied.

Na cheñchet an traoù abaoe an deiz ma oant erruet daou viz kent... Tomaz ne anaveze hini ebet anezho d'ar mare-se... ha bremañ e oa o kimiadiñ, mantret, diouzh ur bagad mignoned ken tost dezhañ hag e familh, kazi.

O sellout e oa.

Ar baotred na oant ket ouzh ar stur a gerzhe en a-raok. An tri c'harr a heulie, an eil war-lerc'h egile, ar charaban a zeue da ziwezhañ, ar wezh-mañ.

Evit reiñ ton d'an tremen o doa gwisket ar gomedianed an dilhad o doa c'hoariet ganto en deiz a-raok –ar re a oa dezho, da nebeutañ. Setu ma oa kreouichennek Doue-Añselm, met distol. Pep hini ao a gantañ da nebeutañ un dra oa ziskoueze peseut rol 'oa bet e hini. Ha tud ar barrez, tolpet a-hed ar ruiou, a huche lesanvioù an aktourien :

"Aotrou Doue ! Aotrou Doue !... Kenavo, Jozeb ! Kenavo, Izak ! Ken ar bloaz a zeu ! Deuit en-dro buan !..."

Ar merc'hed oa azezet er charaban. Ne oant ket

bet gwelet war al leurenn, met bez e oant o hejañ bokedoù brankoù tre evel ar re a oa stag ouzh ar rideozioù-liñselioù e-pad ar pezh.

Ne zaleas ket selloù Tomaz da ziskoachañ e vestrezig, daoust ma oa nebeutoc'h a drouz hag a fiñv ganti eget gant ar re all. Sonn ha balc'h e oa azezet, Lenaig kousket war he brec'h. Ne vouse'hoarzhe na ne huche. Sankañ a rae he selloù en engroez, evel war glask unan bennak. Pa zeuas Tomaz a-benn da dizhout bord an hent e welas anezhañ. Ur sklêrijenn a baras ouzh he dremm kerkent. Astenn a reas ar babig da Loeiza ha lammat diouzh ar charaban en ur hopal un dra bennak.

N'emañ ket o vont da bokañ din dirak an holl emichañs, a hetas Tomaz. Spontus ha burzhudus e vefe bet war un dro...

Ne zeuas ket betek ennañ avat : chom a reas a-dreñv ar charaban m'en em lakaas da zañsal en ur hejañ he divrec'h a-us he fenn. An dud a oa o sellet outi hag o stlapan o daouarn. Goude ur pennadig e sachas Koulm war he frileuzenn hag e taolas anezhi er charaban, a-raok kenderc'hel gant he dañs iskis, he divrec'h o rollañ hag o nijal a-us dezhi evel ur c'houblad laboused en nevez-amzer.

Ar gouriz ruz perlezennet a flammine diwar he dilhad du.

Pa groazias Tomaz sell Koulm adarre, e vouse'hoarzhaz dezhañ gant gras, e saludas, hag e adlammas mistr 'barzh ar charaban.

He daoulagad oa stag ouzh re Domaz, bremañ.

"Mersi evit al levr", a stummas diweuz Tomaz.

"Da c'hortoz a rin, a lâras Koulm gant he daoulagad, he dorn ouzh he gouriz.

– Da c'hortoz a rin", a respontas Tomaz, mut, gant holl nerzh e sell.

Sellet a reas outi o vont diwar-wel, pell, pell, betek harzoù ar gêr, hep lakaat e zaoulagad da vlinkañ.

Pa ne voe ket Koulm evit didoueziañ Tomaz eus ar barrezianiz all a oa o kuitaat ar ru, e astennas he divrec'h hag e adkemeraz Lenaig ganti war he barlenn.

Tomaz a adkemeraz hent ar gêr, war e bouezig ar wezh-mañ.

Seder e oa.